

Breman 8, ru HOCHE 35000 ROAZON

12 lwr

bremañ

GOUERE/EOST 1987 Niv. 70 -71



SINEMA
VET FESTIVAL DOUARNENEZ
POBL AN INUIT

YEZH ISRAEL

**SAVET
A VARV
DA
VEV**

AFRIKA AR C'HREIZTEIZ
POUEZAN WAR TOTAL *apartheid*

Alti on gant Paol ar Meur pa skrivis ne rae ket an "emsaù" tra-walc'h evit ar yezh. Gwir eo evit an "emsaù politikel" : koumananterien Kastenn UDB n'hallont ket resev anezhi gant o chomlec'h c'hoazh. Gwir eo ivez evit an "emsaù sevenadurel" chomlec'hioù renerien Al Liamm a zo skrivet e galleg war "ar c'hoazh kelaoenn vrezhonek" hag he bruderezh ! Breshoneg-hag he bruderezh ! Breshoneg-riev urvad, skrivagnerien anezho a-wechoù, n'ouont ket c'hoazh ober chekennoù breshonek...

Kaos a zo da zivyezhekaat panellou galleg a lezhoù-dikuzad, a-hed an hentou ? Met n'eus tamm breshoneg ebet war bruderezh ar "Festival de Lorient" ! Nag ar re all moarvat !

Mat eo goulenm an divyezheg digant ar gouarnamant. Mat e veje d'an "emsaù" deskif ober gant a-raok !!

Abaoe 10 vloaz bennak ez eus chekennoù divyezheg gant ar C.M.B. : e-keit ha ma talc'h lod d'ober gant ar re c'hallek, ha ma c'houlenn Naonediz kaout anezho en anez, n'omp ket deuet a-benn da lakaat c'hoazh ar CMB da ober bruderezh evite (e-barah Bremañ ?). Koulskoude e weler bruderezh breshonek gant ar PTT (mignon bras d'hor yezh evit a oazomp) e Katalog "Reit Vamp Beu".

Gwenael Tarban.

Kenvroiz ker,

Goude 'hemmennoù evit nive-remn ma Mae 87. Keleier evit ar niverenn a seu war talvezo embann :

1- Ul lizher kaset din gant K. an Duzigou (Moelan), gant ar chomlec'h 9 Br Ouz Sten, Drom-ohonraah, Baile Aha Cliaht 9, (Bro Iwerzhon), stellet er post e Kemper-Penhars d'ar 1.8.87 a zo bet kaset da Hamburg. Eho (?) eo bet merket war ar c'houlenn gant ur stell hingarrezek "mal dirigé sur l'Allemagne 18

Juni 1987, 2000 Hamburg 3". De-gouezhet eo e Dulem d'ar 17 hep trabas all ebet. An Alamanned zo gouest da c'houout petra eo anv kêrbenn Iwerzhon en Iwerzhoneg, pe soken petra dalvez Bro-Iwerzhon, met servijoù-post ar Stad-C'hall a gav atav repu en he lezennou hemmzerel. Servij ar bobl vrezhat na reont ket.

2- Da heul ar galv skignet a-gantadoù gant ar C'hevre Keltekek, em eus bet heklevioù pe adskridoù eus ar respontoù roet gant ur hema Cotte, Attaché linguistique e Karnati Bro-C'hall e London da lod eus an dud o doa bet skrivet d'ar c'hannadour-se gant Diwan.

Ar respont-skouer-mañ a zo bet roet da Matthew Taylor (Kannad Kembrevariat e Ti ar Gumen), da John Fleet eus Coe-thas Flamank, da P.C.Burden (Leeds), da Mick Clifford, pri-soniad e Wakefield (Yorkshire) -troet diwar ar saoneg-

"Abaoe meur a vloavezh eo bet sammet kelennadur ar yezhoù rannvroel -elzaseg, euskareg, brezhoneg, korseg, okitaneg, provañsalleg- gant ar penadurezhioù gall atebek eus an dra-se -da lavarout eo ministr ar Deskadurezh ha ministr ar C'hultur. Evel-se e c'hall ar vugale adalek ar iañ derez betek ar vachelouriezh studioù o yezh rannvroel. Ouzhpenn-se, warlene e voe graet ur strivadeg vroadel e sell da gavout kelennerezh vrezhoneg evit ar skolioù eil-derezh.

Hag e 1985 e voe savet ar "Conseil National des Langues et Cultures Régionales" dindan evshaerezh ar C'hentant Ministr Ar Bez-presidant anezhañ a zo ar c'helenner Michel Denis eus Skol Veur Roazhon, arak e oa bet prezidant Kuzul Sevenadurel Breizh. An aozadur-se hag a ra war-dro kement tra o tennañ da harpañ ha kas war-raok (promotion) ar yezhoù hag ar sevenadurioù rannvroel, ne vanko ket sur da bledif gant an deuz evirion-meurbet (the very real interest) o deus ar Vretoned gant o yezh hag o sevenadur".

Menegiñ a ra an Ao.Cotte ar programoù a vez pellskignet en un douennad yezhoù rannvroel gant FR3 ha Radio France. Komz a ra ivez eus an daou program e brezhoneg a vez pellskignet bep sizhun gant Radio Pays e Paris. "Kement-se a ziskouez, pe 'soñj, emañ ar gouarnamant gall a-verrih-bev (very keen) o skoazellañ hag o tiorren (develop) an holl yezhoù ha sevenadurioù rannvroel.

Evit a sell ouzh DIWAN, ur gevredigezh prevez, un afer rannvroel strizh (a strictly regional matter) e hañval bezañ ; d'ar penadurezhioù lec'hel e Breizh, dilennet en-demokratel, eo da emellout outi kentoc'h eget ar gouarnamant kreiz. N'em eus ket a-se munudou diwar-benn an danvez-se."

Ne ra al Lisher-se dane ebet da Englev C'hweser 1986. D'ar c'hannad Taylor e lavar an "naskad" en doa kaset un adskrid eus e lizher da Viniestr ar C'hultur, da Renerezh ar C'henvroedol, da Darezpredol, da Brevedad, da Ministrerezh ar Deskadurezh ha d'ar C'huzul Broadel benniget (evit ar rannyezhoù ha rannsevenadurioù).

A-zivout ar C'huzul-se e fougas an "naskad" o vesañ ma'n eus un nebeut Bretoned brudat (prominent) e-touez an izili.

D'ic'hek ha laouen, setu an doare reizh da weañ, a Lavare Goethe en ur c'hoapaat. Gant gervet ne vez ket taget servijerien ar Stad C'hall. Ehaont hon eus da ziskuilhañ dihaont o bruderezh faos en estrenvro kouls hag e Breizh. Petra en deus graet ar C'huzul Broadel betek hen ? Pet gwech eo bet bodet abaoe derou 1986 ?

A wir galon,

Alan Heusauff (Iwerzhon)

BEP DAOU VIZ LENNIT
AL LANV



UN ENGLEV KAMM DIGAMM

CHEÑCH AL LEZENN ?

Cheñch al lezenn a vefe aotreañ ober skol en ur yezh all evit ar galleg : brezhoneg, euskareg... Ha kement-mañ n'int ket evit degemeret. Asantiñ a vefe kement hag ofisialiñ ar yezhoù-se.

Setu kavet an tu gant R. MONORY d'en em dennañ ? Evit ar poent e chom direis a-walc'h an niver a bostoù a vefe kemeret e karg. 4 c'hlas CM2 hag 20 klas vamm a vezo gant DIWAN e miz Gwengolo o tont ha ne 'z eus kaoz gant ar Minister nemet eus ur 10 kevrad bennak ouzhpenn ar yalc'had boaz : 150 milion a luriou kozh.

Pell emañ eus ar gant eta pa gevierier gant raktres CHEVENEMENT e 1986. Ma vefe bet roet ur yalc'had da zDIWAN, e-lec'h kenstagañ 31 post e vije bet :

1986	1987	1988
365 milion	495	530

Ar pezh a zo bet roet e 1986 gant ar Minister a ra 250 milion. Ar pezh a ginnig evit ar bloaz a zeu (10 kevrad + 150) a raio kement all da lavaret eo an hanter hepken eus ar pezh en dije DIWAN da gaut ma vefe doujet ouzh sinadur ar Stad.


D'ar Meurzh 7 a viz Gouere eo bet resevet tud DIWAN gant an Ao. Roger ha renerien servijou Monory. E miz Gwengolo e vo gouezet hirroc'h...

J.K.

E mod all, e klasoù CM2 DIWAN e vez kelennet un eur galleg ouzhpenn ar pezh a c'houlenn program Chevenement (8 e.). Ar c'hlasoù all avat, C.P., CE1, CE2, CM1, e vije kendalc'het da ober e-giz pa ne vefe ket diouto.

Setu neuze penaos e c'hall ar Minister kinnig kevradou hep m'en dije ezomma da cheñch al lezenn e-keñver plas ar galleg.

Evito, cheñch al lezenn ne vefe ket evel just aotreañ chom hep ober 'n holl a c'hallec'h na da vithañ kenneubet aotreañ da ober nebeutoc'h.



Andre LAVANANT, prezidant Diwan, goude an emgav er C'huzul Rannvro d'an 3 a viz Gouere

Goude bezañ hirbrederiet sur a-walc'h-keit all a zo emañ o c'hedal e respont dre skrid-an Aotrou Roger Rener Servijou Rene Monory, en deus roet da c'houzout da Andre LAVANANT, Prezidant Diwan, diriaou diwezhañ 2 a viz Gouere, eod prest ar Minister da sinañ kevradou evit ar skolioù mamm hag ar c'hlasoù CM2.

N'eur ket gwall chalet ken war a seblant er Minister, gant an unyezhegzh vrezhonek e skolioù mamm DIWAN. Ret eo gouzout ha derec'hel soñj, n'eo ket ar skol vamm ur skol ret hervez al lezenn. Aesoc'h eo neuze mont e biou.



ATANTOU EVIT

POUEZUSOC'H EVIT UR MIRDİ PE UL LEVRAOUEG

Ganet eo ul lodenn vras eus kêriz war ar maez ha darempredoù o deus miret alies gant o c'horn-bro orin. En degouezh-se neuze, ne vez ket dianaoudek o bugale eus an natur nag eus al labour-douar pa c'hoarvez ganto tremen vakañsoù pe dibennoù-sizhun e ti o zud-kozh pe gant o c'hendir-vi.

N'eo ket gwir evit an holl avat, evit ar re a vev pell diouzh o familh, ha dreist-holl evit ar re n'int ket eus gouenn an droc'herien-buzhug. Pet a vugale a vev e kêr n'o deus morse bet tro da sellout ouzh ul leue o c'heneh, un den o c'horo ur vuoc'h, pe da glevout ur yar o sklokal ... ? Pet anezho a chomo en o spered skeudennoù ur vuoc'h astennet war ur gadorvrec'h ler, pe ur yar plastik o tozviñ ur vi chokolad en ur supermarc'had ?

Daoust d'al liorzhoù ha d'un nebeud tiez-feurm a van c'hoazh e kêr eo bras an troc'h etre ar maezioù hag ar c'hêrioù-dreist-holl e keñver ar vuhez pemdeziek. N'eo ket diziouer brudañ an taolioù-arnod kontrol d'ar stad-se eta : an atantoù bugale a zo dreist evit-se. Daou anezho a zo e Breizh.



"LA VILLE OGER" E SANT BRIEG



An ti-feurm a zo staliet e karter la Croix St Lambert, a zo daou damm anezhañ : tiez hiniennel kozh (1920/30) hag H.L.M.ou (700) savet betek 75.

Birvidik a-walc'h eo bet emsav ar c'hevredigezhioù er c'harter-se er bloavezhioù diwezhañ, hag un tamm mat eus o stourm a zo bet troet ouzh doareoù da gempenn o endro. Abaoe 1975 e oa chomet 34 devezh-arat e-kichen, a-raok ma vefent kemeret evit sevel tiez.

Ha setu perak eo bet astennet tamm-ha-tamm o c'hrabanoù gant an dud war an douaroù-se : liorzhoù, tachennoù foñbal hag an ti-feurm ivez anvet Tachenn Natur la Ville Oger. E 1982/83 eo bet digoret, met pa zo bet kaoz gant an ti-kêr da adimplijout an douaroù o deus stourmet an dud evit ma vefe dalc'het : gallet o deus mirout 13 devezh-arat hep savadur ebet evit an diduamant.

Digor eo an atant d'ar vugale azalek 4 bloaz, bemeiziz : dont a reont a-hiniennou e-pad an amzer-vak ; ha dont a ra ur bern strolladoù gant ar skolioù eus Sant Brieg pe Iregueux : war-dro 1500 bugel a oa tremenet gant ar skolioù dindan tri miz, ha war-dro 200 eus ar c'harter dindan 11 miz e 1983.

Peseurt labour a vez kinniget dezho ?

.Ober war-dro al loened : lapined, givri, deñved, yer, azened...

.Labour koad, pe labour mañsoniñ.

.Dizoleiñ an natur : ar plant, ar wazh-dour, al labour-se tro-dro.

.Kutuilh kistin, mouar ha pourmen war ar maez pe war an aod.

E 1984 eo bet savet ur vilin-avel el liorz a denn dour a-zindan dour : laouen an houi o vourboulhañ en dour fresk dalc'hmat !

Da geñver an digoradur ofisiel e 1983, setu un tamm eus prezegen un den eus ar c'harter : "Anañ en ti-feurm a vez stok bugale ha tud bras ouzh ar pevar danvez : an dour, an dour, an tan, hag an aer, danvezioù hag a zo ken pouezus er vuhez. (...) An ti-feurm a zo ul lec'h a-savempredoù etre ar vugale disheñvel, etre bugale ha kerent, ul lec'h da atoleiñ loened, plant ha tud (...)"

Anañ en em sant libr ar vugale, ha kiriek eus an traoù a gasont da benn. Bevañ a reont hervez o c'hoantoù, ha hervez kele'hadoù an natur" (tennet eus Courant d'Air, niverenn 30, ke-laouenn ar c'harter).

AR VUGALE

"LES GAYEULLES" E ROAZON

Abaoe 1978 eo digor an ti-feurm-mañ. Er bloavezhioù 1975 e oa e soñj an ti-kêr krouiñ unan e kreiz ar Z.U.P.-Sud (60 000 den), met aesoc'h eo bet kavet implijout ar savadurioù lezet en ur c'harter-all hini PATTON. Emañ staliet e kreiz un dachenn-natur : parker, koajoù, lennoù, poull-kou-ronkañ...


Prenet eo bet al loened gant an ti-kêr, adkempennet an tiez, ha gopret eo bet al labourer-dour gozh betek he leve. Moaien a zo bet dezhi kenderc'hel d'ober war-dro he loened evel-se daoust ma oa digresket a-galz an douaroù (chom a ra 10 devezh-arat, 6 anezho en dour-geot).

Al loened miret en atant a zo : saout, poneed, givri bihan, deñved, moc'h, lapined hag a-bep seurt evned-yeer. Evit an dour, eo troet al labour endro d'al legumaj-liorz abalamour d'ar plas.

Abaoe ar penn-kentañ eo bet digor bras an atant : da lavarout eo e vez degemeret e-vit netra n'eus forzh peseurt bugel azalek 6 bloaz, ha mont ha dont a ra pa gar. Eno, e ra ivez ar pezh a blij dezhañ, tri animatour o kinnig dezhañ al labour-mañ-labour. Met dre ma feus bugale 'zo abalamour d'ar poneed nemetken, eo bet miret evit ar re o deus labourer tamm pe damm nemetken.

Bez e c'hell ar vugale tremen un devezh a-bezh er feurm en ur biknikañ war ar plas. Berzh bras a ra an atant : dont a ra bugale ar c'harter dreist-holl, met deus pelloc'h ivez. Un daou-ugent bennak a grouadur a vez ingal diouzh ar merc'her ha sador, hag e-pad ar vakañsoù ; e-kerz an haf e vezont stankoc'h evel just.

Digor eo ivez an atant d'ar strolladoù bugale, ha dont a ra skolioù, evel e Sant-Brieg War-dro 10 000 devezh/bugel a vez kontet bep bloaz.




E-keñver pedagogiezh, din da c'houzout, n'eus ket bet studiadennoù diwar disoc'hoù ur seurt aevadur. Ha penaos rentañ kont eus plijadur ar vugale, eus an anaoudegezh a zastumont, hag eus stumidigezh o fersonlezh en ur vevañ tostoc'h diouzh an natur ?

Ha n'eo ket anat eo pouezusoc'h evit ar re vihan eget ul levraoueg, ur mirdi pe ur "greizenn sosial", dreist-holl pa ne fiñv ket an hanter eus ar familhoù e-pad ar vakañsoù ?

Ha marteze e soñj deoc'h eo ker-ruz ur seurt atant, ha ne vije nemet ar c'hêrioù bras evit paeañ anezhañ. N'eo ket gwir. Ar skoilh kentañ a zo hini an dour pa vez ken ker an dour er c'hêrioù, met evit traoù all e vez kavet... Ha goude e c'hell servijoù an tiez kêr labourat, evel e Roazon e-vit kempenn an douaroù, ar savadur hag all... An animatourien a vez paet ivez gant an ti-kêr, met ur yalc'hant a vez roet gant ar c'h.C.A.F., evel ma vije ur U.L.S.H.. Ha goude ne vez nemet war-dro 30 000 lur dispignou ouzhpenn bep bloaz.

N'eus ken nemet daou atant bugale e Breizh : un treme a zo kaoz da sevel e-kostez An Oriant ; un tregont bennak e Bro C'hall. Hag-eh ne vefe ket unan da gempenn e pep ker-er bras, hag e pep kêr ?

Jean-Yves BROUDIC



ETRE VROADEL

GWASKEREZH

A RISCOSSA DIVODET



Feulster ar boliserien... Ar respont d'ar re a lar nann da zibaboù ar galloud.
Piv a gred prezeg deus Gwirioù Mab-Den ? Pasqua ?

Goude an MCA e miz Genver (sellet ouzh BREMAN niv 64 - Genver) eo bet divodet A RISCOSSA, kevredigezh skoazell d'ar brizonidi (da geñveriañ gant SKOAZELL VREIZH) gant gouarnamant Bro C'hall. 2000 den o doa manifestet war an taol e Bastia d'an 23 a viz Even en ur gondaoniñ an divodadur.

Demokratiezh, Gwirioù Mab Den ? Taget ar vroadelourien war an dachenn bolitikel (divodadur an MCA, difenn da brezeg ...) taget familhoù ar brizonidi (divodadur A RISCOSSA), taget ar brizonidi bolitikel (lizheroù, gwel adenoù difennet...). Ur skouer : ouzhpenn ur miz zo eo bet kaset pemzek broadelour e prizon Marsilha (Oksitania), dibaoe kelou ebet, lizheroù ha gweladenoù evit ar familhoù, difennet.

PASQUA E KORSIKA

UR VEZH !

et eo Pasqua da Gorsika fin miz Even. "Stourmit a-enep d'ar vroadelourien hag e voo'h sikouret ganeomp !" Setu dre vras ar pezh en deus laret. D'ar re ne oant ket a-du gantañ en deus respontet gant e CRSe.

N'eo ket bet aes an traoù evit Pasqua en e vro a orin. Manifestadeg dilennidi ar vroadelourien e Kuzul Korsika, manifestadeg ar vroadelourien e-pad e brezegenn e Aiacciu. Aze, avat, e oa troet fall an traoù. Skoet o doa ar C.R.S.-ed, gant ur feulster digredus, gant ar vroadelourien.

Ugent emsaver harzet war an taol. Aet e oa o c'harradeg da c'hortoz kelou deusout sioul-tre, dirak ar c'hoiserdi ; en o zouez e oa an Abbad Mondoloni. Dont a reas un 10 poliser bennak, kefridiet gant an enseller Morin (Bretton a orin, ma n'eo ket ur vezh), da c'houl digant an Abbad heuliañ anezho.

Nac'h a reas. Setu ma trapas taolioù treid ha taolioù dorn a-raok bezañ kaset dre an nerzh. Pemp emsaver zo bet dalc'h et ha barnet kerkent.

-Paul Buresi, 1 bloaz toull ; Ghambattista Rotily Forioli (hanter vretton anezhañ) 8 miz toull ; Abbad Mondoloni, 1 bloazgant 6 miz toull ; Jean-Pierre Gilquin, 6 miz gant 3 miz toull ; Jean-Pierre Arrighi 6 miz gant goursez.

E KORSIKA

Tamallet e oa dezho : nac'h-sentiñ d'al lezenn (nac'h et o doa heuliañ ar boliserien). Klask adsevel un emsaver divodet (youc'het o doa FLN II). Dirak traoù ken distret, e tiskler mat ar galloud penaos e respont d'ar re ne soñjont ket e-giztañ. Bez 'e c'hall Pasqua, mestr kozh ar SAC prezeg eus Gwirioù Mab-Den.

WANTED



AFER AN DR LAFAY

Juast war-lerc'h tout ar vrezeg eo bet lazhet an Dr Lafay dirak et PRS.

An Dr Lafay, medisin loemed e Corti, a oa anavezet e-giz penn kevredigezh gouzañverien ar sponterezh hag ivez e-giz unan eus pennoù ar C.F.R. (Korsika Gall ha Republikan). Ar CFR a stourm war an dachenn bolitikel a-enep d'ar vroadelourien gant menozioù an tu dehou pellañ ; kenlabourat a ra gant ar bolis hag ar varbouzed.

Gant piv eo bet lazhet diskeriet diouzhtu ar galloud, "ken anat eo". Ken anat, ya, re anat marteze. Lazhet eo bet dezhe diwezhañ beaj Pasqua hag



G.B. Rotily Forcioli goude bezañ bet skoet. Flastret e vo gant ar bolis. Ar rener broadelour a zirenk... Kondaonet e vo da 8 miz toull !

a zo bet ur c'hwitadenn vras ; lazhet eo bet just war-lerc'h un tabud en tele 'lec'h na kemere perzh daou vroadelour ; lazhet eo bet dirak ur c'harr gant pevar poliser armet ennañ. Ar feson ma eo bet implijet diouzhtu an afer war an dachenn bolitikel a-enep d'ar vroadelourien zo iskis a-walc'h.

Furchadegoù, harzadegoù, pep tra zo bet implijet gant ar galloud. An degouez a oa ken brav evit klask distruj tout frammoù ar vroadelourien.

An FLNC (Talbenn evit Di-eubidigezh Vroadel Korsika) zo boaz da ziskleriañ diouzhtu eo int pa 'z eo bet graet an taol ganto. Aze n'o deus ket graet. Ouzhpenn, pa 'z eo bet faziet ganto, o deus anzavet. Evit an taol-mañ o deus nac'h et krenn bezañ kemeret perzh. Setu ar

gemennadenn kaset gant an FLNC : "Evidomp e oa an Dr Lafay tost-tre d'ar varbouzed, kenlabourer gant ar bolis ; met nac'h a reomp bezañ lazhet anezhañ. Gouzout a reomp e oa "provokasionoù" o tont, e oa ar varbouzed o preparañ taolioù. Kredif a reomp o dije gortoset un tamm muioc'h a amser goude diskeriarioù taer Pasqua. Evidomp eo an taol-se pa kentañ strategiezh ar varbouzed a-enep ar vroadelouriezh. Goul a reomp an evezhañs hag an emsav evit kout un diskoum bolitikel (...). Politikerezh diboll an tu dehou ne c'hoñcho netra e-keñver hor pal."

Dominig JOLIVET

(Luc'hskeudenoù U RIBOMBU)



"Distruj ar vroadelourien", hent ar galloud...

SINEMA



VET FESTIVAL DOUARNENEZ
POBL AN INUIT



Emañ an INUIT o vevañ en Hanternoz Uheñ Bro Ganada, abaoe 15.000 bloaz bennak, sañset. Treuzet o dije strizh-mor Bering, etre Amerika an Hanternoz hag Azia, d'ur mare ma oa un hent-douar etre an daou zouar-bras. Abalamour da-se eo e vefe kar an Inuit d'ar poblou o vevañ en tu all d'ar mor.

Chom a reont war dachennoù a zo sellet evel reoù kelañ-tañ an douar d'an dud. Bevañ a reont dreist-holl diwar ar chase : karibou, loened-mor hag ivez pesked-d'an nebeutañ betek nevez 'zo c'hoazh.

Daoust ma 'z int strewet a-hed 4000 km bennak, e tal-c'hont d'ar memes doareoù-bevañ ha d'ar memes yezh war bouez nebeut. Bez e vefent war-dro 28.000 a dud hiziv-an-deiz er C'Hanada.

O sevenadur henvoazel a zo bet stummet, evel just, gant an endro. Bezañ e-unan eno a zo koulz ha bezañ kondaonet d'ar marv. Start kenañ eo ete al liammoù kerentiezh hag ete ilizil ar gumuniezh. Diorreet eo bet an darempredoù a hegarated etre an dud, etre ar vugale hag o zud. Mont e kounnar a oa un dra fall-tre, zoken e-keñver ar vugale.

UR YEZH BOUTIN

An INUKTITUT eo anv yezh an Inuit. N'eo morse bet skrivet arak an 18vet ha 19vet kantved, ha daoust da-se eo chomet unvan. Gant misionerien eo bet skrivet evit ar wech

kentañ. Ha brezel ar skritur a zo bet degaset ganto. E dibenn an 18vet kantved e voe savet un doare-skrivañ diazezet war al lizherenneg roman gant misionerien eus Moravia. Ur c'hantved diwezhatoc'h e voe savet ur skritur all gant douzez arouez o skeudennin ar sonioù.

An daou zouare-skrivañ a vez implijet hiziv bepred, alies kichen-ha-kichen er memes levr. Met an eil eo a blij ar muiañ d'an Inuit abalamour ma 'z eo unan dezho o-unan. Ha gant teknikoù nevez an urzhiaerezh -n'eus mui kudenñ ebet evit moulañ skridoù er stum-se.

WAR DU AN EMRENEREZH

N'eo ket bet an darempredoù gant an dud a-ziavaez, "ar re wenn", hep lakaat en arvar da-zont pobl an Inuit. Da gentañ o tegas kleñvegiou, nevez, dianav dezho betek neuze, evel ar grip spagnolat a lazhas kalz tud.



Met dreist-holl peogwir en em lakaas an Inuit d'ober kenwerzh ar feur gant an estran-jourien hag e voent paket e sistem ar marc'had ha kondaonet da produñ muioc'h mui evit prenañ binvioù nevez a gouste ker.

An douaroù a oa dedennus a-hend-all evit pinvidigezhioù ar c'hondon hag an dour-dredan a oa tu da denañ diouto.

Rankout a reas neuze an Inuit difenn o gwirioù. Nevez 'zo eo en em vodet holl poblou an Hanternoz Uheñ evit keñveriañ hag unvaniñ o stourmoù.

Klask a ra an Inuit bevañ er bed a-vremañ o terc'hel ar muiañ ar wellañ d'o fersonelezh, ha n'hall ket mui bezañ sellet outo evel ma rae lod, e-giz ur pobl war an diskar.

Da gentañ e yae ar vugale e-barzh skolioù diazev a-grenn d'o sevenadur. Bremañ ez eus kerent o deus divizet sevel o skol evit desevel o bugale en un doare henvoazel, tost ouzh an natur.

Er C'Hebeg Nevez, da heul Emglev Bae James hag Hanternoz Kebeg e 1975, e vez graet skol e inuktitut eus ar skol-vamm betek fin eil klas ar 1añ derez. Adalek an trede bloavezh eo ar saozneg pe ar galleg a zeu da vezañ yezh kentañ. N'eus mui neuze nemet etre teir ha peep kentel ar sizhun en inuktitut.

Betek-hen eo bet ar radio ha dreist-holl an tele, binvioù o reiñ d'an Inuit ur skeudenn disheñvel a-grenn eus ar pezh eo o buhez hag o sevenadur.

Abaoe neb amzer hepken int krog da imp. un tammig ar binvioù-se. Abaoe 1958 ez eus inuktitut war wagennoù Radio Kanada. Radioioù lec'hel bihan a zo ivez.

SINEMA

28 A VIZ EOST -6 A VIZ GWENGOLO

Bez e vefe ivez 5 eur 1/2 tele ar sizhun en Inuktitut hag e saozneg evit an Inuit.

Tamm-ha-tamm eo en em lakaet an Inuit da sevel o aozadurioù o-unan. Savet o deus kooperatiboù, aozadurioù evit o-ber war-dro al lojeiz. Kemer a reont perzh er vuhez politikel evit mont war-du an emrenerzh.

Embann a ra gouarnamant Kanada ez eo a-du gant ar pal-se. Dedennus e vo eta komz gant dilennidi an Inuit e Douarnenez evit keñveriañ ar pezh a sonjont gant ar bruderezh ofisiel.

Tangi Louarn.

Filmoù nevez a vo kinniget o tont eus anorelezhioù deut dija da Zouarnenez ar bloavezhioù paset :

- 1978 : KEBEG
- 1979 : -BROADOU INDIAN AMERIKA AN HANTERNOZ-
- 1980 : POBLOU AN DOM-TOM
- 1981 : OKITANIA
- 1982 : POBLOU URSS (Ameni, Kri-ghizi, Georgie)
- 1983 : POBLOU TZIGAN AN EUROPE
- 1984 : POBLOU INDIAN AMERIKA AR C'HREISTEIZ
- 1985 : AR RE ZU EN USA
- 1986 : KATALONIA
- 1987 : POBLOU AN ARTIK

TUD AN ARTIK

War ar roll e vo : "A la Conquête du Pôle" gant Georges Melies, "Nanuk l'Esquimau" gant Robert Flaherty, "Les dents du Diable" gant Nicholas Ray, "Ski-erri" gant Markku Lehmuskallio, "L'esprit du vent" gant Ralph Liddle, "The White Dawn" gant Phillip Kaufman, "Debout sur leur terre" gant Maurice Bultman, "Per-sou Ouzala" gant Akira Kurosawa, "Les récits de Tuktuk" gant Laurence Hyde, "Jus-tice blanche" gant Françoise Mera ha Morgan Laliberté, "Inu-ghuit" gant Staffan ha Ylva Ju-ten, "La terre de nos ancêtres" gant Rauni Mollberg, "Inuit"

gant Jean Malaurie, "The White Reindeer" gant Erik Blomberg, "Arktisia Matrakulva" gant Sakari Palsi.

Bez e vo e Douarnenez, e-giz boaz, azerien filmoù ar broioù pedet, diskouezadegoù, sonerezh hag all...

Plon, renet gant Jean Malaurie. Un ethnologour eo hag en deus skrivet "Les derniers Rois de Thulé" a gont buhez tud o vevañ en Artik er bloavezhioù 50.

Ur wech ouzhpenn e vo lakaet ur sell ouzh ar filmoù a zo bet graet e Breizh e-pad ar bloaz, gant ar c'henstrivadeg.



Deuket bloaz ar gouel eo. Un abeg eo neuze da lidañ anezhañ gant un tan-arvest, sonerezh ha filmoù evel just. Gwellet e vo filmoù neuze savet er broioù-se abaoe o azead e Douarnenez.

D'on 31 a viz Eost, en 1 hag an 2 a viz Gwengolo e vo aozet ur c'hendiviz "Yezhoù ha Sevenadurioù bihan hag ar Sellet ha Klevet".

Bodet e vo azerien filmoù, video, c'hoarierien, yezhonourien hag all...

Daniel ar Gevel.

TITOUROU "Daoulagad Breizh" e Douarnenez - Erwan Kallic - pe: 98/92.97.33. pe MIC Douarnenez Gilbert le Guillou -98/92.10.07




Lidet e vo ivez tregonet dezhañ-bloaz an dastumadeg levrioù "Terres Humaines" e TI

DUDI

LUC'HSKEUDENNOU

GANT J. FLAHERTY



Warlene, e-pad 9vet Festival Sinema ar Minorelezhioù Broadel e oa bet kinniget, evit ar wech kentañ er c'hwec'hkorn moarvat, un diskwezaedeg luc'hskeudennoù gant eizh aozour e-touez ar re skoueriusañ eus "luc'hskeudennerezh nevez Katalogna".

Gant ar berzh en deus graet, hag evit kenderc'hel da lakaat asamblez doareoù lies-seurt arz ar skeudenn, eo bet divizet mont pelloc'h c'hoazh gant skipailh ar Festival : kinniget e vo oberenn luc'hskeudennerezh ar filmaozer Robert J. FLAHERTY en ur pezh evit ar wech kentañ.

Etre 1920 ha 1922 eo bet savet al labour-se, pa oa an oberour o rakjediñ doareoù e film da-zont "NANOOK", met ivez pa oa o "treiñ". Ur seurt sell e oa war ar pezh a zleije dont da vezañ unan eus pennoberennoù ar sinema danevellin.

Ouzhpenn o zalvouddegezh dibar a zielloù, ez eo dedennus kenañ ar fotoù-se dre ma tiswezent ampartz FLAHERTY gant poltreoù dispar gwazed, maouezed ha bugale Inuit.

Dibabet eo bet hanterkant luc'hskeudenn e-touez kantadoù a oa e-kerz an TI REVILLON, marc'hadour feur e Paris, en doa, en amzer-se, gourc'hemennet ar film.

T.L.



AL LENNEGEZH VREZHONEG A-VREMAN

GANT YANN GEFELEG

Ma fell dimp treiñ ar yaouankizoù gant ar brezhoneg eo poent kregiñ da sevel evito ul lennegezh a gomzfe anezho, eus an amzervezh a vevont. Rak, mar seller ouzh stad an embannerzh brezhonek hiziv, n'haller ket lavarout eo krouiñ ar preder kentañ : adembannadurioù (Abeozen, Drezen, hag all), envorenoù (Elias, Seite), setu ar pezh a gaver dreist-holl lennegezh avat, na vez ket skrivet ne meur.

Unan a zaou : pe e plij ar saviad-mañ d'al lennerien, ha d'an embannerien a c'hallo chom pell da c'hortoz klet er gêr dorskridoù na vint skrivet biken, en ur zerc'hel da lakaat advoulañ skridoù bet embannet 30 vloaz zo ha n'o devez a-wechoù perzh heverk ebet, nemet an digarez istorel e ve ; pe ez e ar re-mañ da glask ar skridoù nevez o deus ezhomm (evel ma 'z eont dija da gerc'hat ar skridoù kozh da embann el levraouegoù), e-touez ar vrezhonegrien, o lennerien da vihanañ.



BOUNTAN, BROUDAN, KUZULTAN, SKOAZELLAN...

Rak bez ez eus, e-touesk al lennerien, tud barrek da gemer ar bluenn. Ha bez ez eus re all, ha fiziñs a-walc'h enno, da gregiñ ganti da gentañ, ha skoazell da c'houde. Labour an embanner eo kement-se, e broioù all da vihanañ.

Diouzh ma tibabo an embannerien bodañ en-dro dezho kenlabourerien da gas al labour-se en-dro e vo puilhoc'h war-c'hoazh an danvez-lezenn brezhonek... ha brasoc'h dibab ar gelennerien a c'hallo neuz reiñ d'o skoldi o gwalc'h a skridoù modern, merk anat ul lennegezh vev, arouez ur bobl na venn ket mervel. ■

Evel just n'eo ket diouzh-tu e savo ar pennoberennoù. Tamm ha tamm avat en em varrekaio an deskarded, ha em varrekaio an deskarded, ha em varrekaio an deskarded, ha em varrekaio an deskarded.

Lennerien zo a oar yezhoù estren, darn anezho a gelenn yezhoù zoken. Kregiñ a c'hellfent da dreiñ oberennoù, berr da gentañ, diwar ar saozneg, an alamaneg, ar spagnoleg, ar yezhoù keltek all... En amzer Gwalarn e veze graet... Ha diwarrekoec'h e vije brezhonegrien hiziv ?

Ul lennegezh evit krennarded zo da sevel ivez : galout a rafe servij da embregere donezonoù danvez-romantourien. An doareoù e kazetennoù Breizh, ar re c'hallek ivez, a c'hall reiñ menozioù d'ar re n'oufent ket pelec'h o c'hilask, ouzhpenn ma rount ur skeudenn eus hon c'hevredigezh a c'hell hon awe-nkañ... pe hon broudañ da ziskar.

KONTADENN AN HANV

CHAS HA MORAERION

GANT HERBERTO HELDER



Bout e oa ur c'hi hag en doa ur moraer. Ar c'hi a c'houlennas digant e briedetra a c'halled da ober gant ur moraer. "E lakaat el liorzh da ziwall", a respontas-hi. Ne zleer ket lezel ur moraer distag el liorzh pa vez tost d'ar mor. Ar moraer zo un den savet diwar c'hourfennec'her, hag aon a c'haller da gaout rak galloud ar ger-diaez : ar benn-rann'mor". E-lec'h diwall al liorzh e tec'hfe d'ar mor a-benn ar fin. "Laosk-eñ da de-c'hal", eme gwreg ar c'hi. Met eñ ne oa ket all ganti. Rak ur fed a zlefe bout ar memes fed betek harzoù ar seizh posubl : an neb en deus ur moraer da zi-rou kousto pe gousto, heñvel dra gant ar c'hi, pe an tiegezh chas, n'en dije ket a voraer, hennezh a zle chom hep en dout ken na vo ket ret dezhañ. "Neuze n'eo ken nemet mont da chom en Argoad. Pell diouzh ar mor", eme ar guez. Ha neuze ez ejont kaset gante war-bouez ur roll. E-pad o beaj e weljont kalz gweledvaou. Souezhiñ a rae ar moraer gant ar gweledvaou a c'hall bezañ pell diouzh ar

Meur a evezhiadenn a eure a-zivout kement-se, ma voe laosket chilpadennoù fent gant ar chas, a gensonje, en tu dioude, o doa ur moraer gwall speredek. "N'eo ket an holl chas o deus c'hañs eveldomp, eme ar c'hi, hag anaout a ran meur a g' a zo mistri meur a voraer amant". Plijet a-walc'h e oant eta en arbenn da se ha larout a raent d'ar chas all a gaozient o doa ur c'hi speredek dispar.

"Bout zo gantañ ur brederouriezh ag ar gweledvaou", eme ar c'hi. Ur chi eus an Estrela, a emgavjont gantañ tost da Serra da Estrela evel just, a c'houlennas oute ha kavout a rae ar moraer ar sardin. "Bout so gantañ" a respontas ar guez. "N'on ket souezhet tamm", eme ar broad. Hag evit gwir en hañvale ket bout souezhet. Pa zegouezhjont e kreiz ar Argoad e feurmjont un ti gant ul liorzh ha lakaat ar moraer d'el di-wall. "Diwall-hi", eme Leuskel a rejont gantañ en e gichen un doueenn voestadoù sardin ha mont tre en ti. Seizh deiz ha seizh noz e prederias ar moraer e gweledvaou an argoad, ha debriñ a eure sardin ar boestou.

Goude-se e krogas da vougañ ha stagañ da dreiñ e-kreiz al liorzh en ur ober kalc'hoù bihan-ouzh-bihan. Ar chas a oa o sellout outañ dre ar prenest hag a wele e kolle ar moraer e nerzh da bep tro.

Un deiz, da serr-noz, e kouezhas war e gostez, diel-c'het. "Ar mor", en klevjont o larout. Neuze ez ejont en-dro d'an ti da gousket. Antrozez abred e teujont d'al liorzh hag e wirtjont e oa marv ar moraer. "Ur moraer ken speredek e oa", eme ar guez. "Ya, 'but, eme ar c'hi, n'antras eo". Ha douarañ a rejont ar moraer dindan ur wezenn-gasia. Met pende gwir e oant gourdonet ouzh buhez an argoad nend ejont ket en dro da chom en arvor. Ha biken ken n'o devoe moraer ebet. "Da betra ? eme ar guez, e-vel-se." Ha piv a gredo hon eus evel-se. "Ha piv a gredo nac'h edoa ar gwir ganti ?

Troet diwar ar portugaleg gant Mark Kerrain

Herberto HELDER zo ganet e Madeira e 1930. Barzhonegoù en deus skrivet dreist-holl, met un nebeud kontadennoù awenet gant andiskiantegezh en deus lakat embann ivez.

AR SKIANT HAG



1) hon empenn kleiz a zo hini ar ratozh, ar poell, an emskiantaat dre galloud ar c'hompren-dereout a ra ouzh ar skiantouzh hor sevenadur. Er skolioù ne lakaer nemet an empenn kleiz da labourat.

2) hon empenn dehou a zo hini ar reiz, an askre, an emskiantaat dre galloud an hevezout: dereout a ra ouzh an Hengoun, ouzh an holl draoù ne c'heller ket kelenn anezho. Ne c'heller ket displegañ anezho kennebeut. Ne c'heller nemet diskouez an hent evit mont e darempred ganto. Tud meur an Hengoun (Lao-Tseu, Platon, Tchoang-Tseu, Pythagor, hag all...) o deus diskouezet an hent d'ar re a fell dezho. N'o deus ket roudennet an hent, rak dibosubl eo : "An hent a c'heller roudennañ n'eo ket an Hent" (Lao-Tseu, en "Tao-Te-King").

Ar re a zo deuet war o lerc'h, ya, o deus klasket roudennañ an hent, evito o unan hag evit o galloud : hag evelise e savas ar rannpredennoù...


Ar sevenadurezhioù hengounel rik evel an Ejiptiz ne lakaent nemet ar reiz (an empenn dehou) da labourat da vat -setu perak int ken "digomprenus" evit ar glaskerien a-vremañ (pa n'eus seurt ebet da gompren enno !... rak reif a raent da hevezout ha da hevezout hepken). Ober a raent ar c'hontrol-mik eus ar pezh a reomp-ni !...

Hor sevenadurezh-ni a zo bet an hini kentañ o lakaat an empenn kleiz da labourat kement -se. Un den evel Pythagor (hag a rene e vuhez war hor boull-

(pensée réfléchie) eo, lec'h ar spisel, ar skiant-vat, ar poell. Mont a ra en-dro gant ar c'hompren. An empenn kleiz a zo empenn ar skiant.

AN EMPENN DEHOU'zo lerc'h ar santerezh, an askre, ar reiz. Mont a ran en-dro gant an hevezout. An empenn dehou a zo hini ar varzhoniezh, an arz, hag an Hengoun.

An empenn kleiz
a labour gant al lojik
en deus skiant an amzer a dremen
en deus skiant ar munud
a vez lakaet da labourat gant ar
C'HOMPREN



An empenn dehou
a labour gant ar santerezh
en deus skiant an amzer-vremañ
en deus skiant ar furmoù
a vez lakaet da labourat gant
an HERVEZOUT

AN HENGOUN

UR STOURMEREZ DIDROUZ

MARC'HARID GOURLAOUENN

dour e mare diskar ar Romaned) a lakaet an daou da labourat asambles, an hevezout hag ar c'hompren. Eveljust n'eus nemet ar pezh a zo moien da gompren en e oberiad a vije kelennet en amzer a hiziv. Ar perzh eus e oberiad da vouetañ an empenn dehou a zo bet laosket a-gostez -nemet gant tud an Hengoun.

En amzer a hiziv e vijed techet da varn an traoù evel-hen :
N'eus seurt ebet da gompren en Hengoun : an arouezioù, ar mojennoù-marz, ar parabolennoù hag all... a zo disterachoù mat evit ar vugale.

Respont : an arouezioù, ar mojennoù-marz, ar parabolennoù hag all... a zo magadurezh da vouetañ an empenn dehou, binvioù da lakaat an askre, ar reiz da vont en-dro dre an hevezout

N'eus nemet leuskel an empenn dehou sioul evit kaout peoc'h, ober evel ma ne vije ket anezhañ, ha mat pell'zo ! An askre, an hevezout ne servijont ket e sevenadurezh ar skiant hag an danvez ma vevomp enni !

Respont : eno, just a-walc'h, 'ni eo emañ an dalc'h !

Petra a ra an empenn dehou pa vez dilezet ?... C'hoari trolioù kamm d'e berc'henn 'nie, ha n'eo ket tamm ebet chom kous-ke !

Met ur wech all marteze e komzin diwar-benn an dra-se (kavadenn an Dr Julian Jaynes, Boston 1976 : ar spered "hical-meral"). An empenn kleiz en deus un dra bennak da gelenn eo ar mistri-se.

An empenn dehou en deus ur "mestr" : "hent peurbadel" Lao-tseu eo ar mestr-se. Ar riskl (bras) a zo da zichenañ kavout un hent direizh... evel Marc'heien an Daol Grenn... war an daouzek (daouzek evel... an Ebestel... sell ta !), unan hepken a gavas ar Graal. An dud bodet, pa weljont ar Graal, ne c'houlennjont seurt... hag ar



Graal a yeas kuit. Ne c'houlenn-jont seurt peogwir n'eus seurt ebet da c'houlenn, seurt ebet da gompren, seurt ebet da gelenn.

Lao-Tseu a lare (2500 bloaz 'zo) diwar-benn Hengoun ar Sinaiz, an TAO :

"An TAO a zo goullou, met d'heskus eo !
Pebezh istonk !"

Ar re o deus graet studioù uhel a zo ar re fallañ alies war hent an Hengoun, rak hent ar gwir Hengoun a zo goullou !...

En Hengoun ne servij da netra gouzout kaozeal brav, rak ne c'heller nemet chom mut, mut dirak ar Graal, mut dirak an TAO, mut dirak an Islonk dihesk ! Hag e teu bremañ ar soñj din eus an daouzek penn souezhus-se kalfichet er maen e iliz ar Merser : pennoù tud serret kloz o genou ganto ha digor bras o daoulagad. Goulenn a raen gant Foñs de Kort, ar c'hliker Izelvroad brudet a zo o chom just kichen an iliz-se, petra 'oa bet klasket kalfichet er maen aze ?

"Ret eo gwelet, ha chom mut", a respontas din ! ...

A et eo diouzhip Marc'harid GOURLAOUENN, d'an oad 85 bloaz. Ha leun a dristidigezh eo bet hor c'halon. N'he deus ket Marc'harid lakaet da gomz diwar he fenn, met, benbez he deus labourat ha stourmet evit yezh he Bro. Benbez e-pad 40 vloaz he deus difaziet poelladennoù skolidi SKOL OBER, hag hi, koulskoude sammet gant labour ur c'henverzh hag hini he familh (daou vreur hag ur c'hoar).

Bevet he deus e Douarnenez, "kuzh ha diglod", hep disterniañ eus he labour. Ur wech bennak eo bet da Gendalc'h ar "Framm Keltiek" e 1943, e Roazhon. Harzet e voe ivez e 1944 ha kaset d'ar c'hamp "Marguerite" e Roazhon. Deut en-dro d'ar gêr e kendalc'h has ken sioul ha tra gant he labour.

E Kallag, e 1962, e voe aozet ur pred an hec'h enor. Dont a reas di ur bern mignoned hag a brofas dezhi ur skriverezh d'he sikour en he labour ! Hag e tistroas da Zouarnenez da genderc'hel gant he labour pemdezhek. E 1982 e voe ur gouel e Sant Vik da lidañ 50vet deiz-ha-bloaz krouidigezh "SKOL OBER". Un devezh kaer e voe evidomp holl ken-dro ha yaouank bezañ bodet en-dro da Varc'harid. Ar wech diwezhañ e voe, met seder e c'helle bezañ hor mignoned : derc'hel a rae ur skipailh yaouank gant an erv boull'het ganti.

N.Olier



KONTADENNOU

UR MENOZ

KENSTRIVADEG CMB-RBI

N'eo ket alies ez eus tro da welet embregerezhioù oc'h emellout eus sevenadur, ha dreist-holl marteze hini Breizh. Seul blijadurusec'h din eta ober anv eus ar genstrivadeg kontadennoù a zo bet savet e Breizh e pevar departamant, siwazh, gant ur bank, ar C.M.B. (va bank kea !), skoazellet gant Radio Breizh Izel. Ar pezh 'n eus bet tro da welet avat a oa aozet penna da benn gant tud ar bank. Evit Bro an Naoned eo kaoz m'emañ en diavaez, din da c'houzout, ar fed n'eo ket ar C.M.B a gaver eno.



Bezot pe vezet, diazezet war ur raktras heñvelik ouzh hini Kan ar Bobl, met gant muioc'hik a arc'hant a-dreñv, emichañs, ez eus loc'het ar bloaz-mañ eta ur genstrivadeg vras, he fal lakaat tud ouzhpenn 55 bloaz da genstrivañ war dachenn ar c'hontadennoù, koulz e brezhoneg, e galleg hag e galleg. Menegomp ivez ez eus bet roet ur guchenn prizioù ha n'int ket divalav da gaoz e mod ebet, ha ouzhpenn ez eus bet poaniet da lakaat 'barzh ar jeu ar strolladoù re gozh ha n'eo ket hini-enoù, peogwir e ranke ar genstriverien bezañ paeronet gant re gozh o farrez.

Ne ouezan ket pet live kenstrivañ a zo bet dre just. Met tri a ouezan a zo bet da vihanañ. Ar re gentañ a oa dal-c'het war vent arc'hantoniou, hag alise war lerc'h ar rakdi-babou-se, ez eus bet graet kenstrivadegoù brasoc'h brasañ, pe gentoc'h uheloc'h uhelañ o live.

E-touez barnerien rakkenstrivadeg kanton Landerne e oan -ma oa deuet tro ur pemzek den bennak da genstrivañ eus ar parrezioù a dro war dro tost : Plouedern, Sant Ionan, Plouziri ha Dirinon dreist-holl. Menegiñ a c'hellan e oa bet poan (met ne gav ket din e vefe klasket re en holl) o kaout barnerien a gompren brezhoneg. Ar boan a zo bet sur, avat, eo o klevet tud kozh 'zo o kontañ e galleg istorioù a vefe bet deuet brasoc'h e brezhoneg sur a-walc'h.

Met pa 'z oa bet anv da varn e oa a-unan ar varnerien

a oueze brezhoneg hag ar re zivrezhoneg. N'oa bet rakchoazet nemet pemp den, an holl anezho o vezañ kent e brezhoneg, ha diouzh ar re-mañ oa daou da vezañ anvet da vont uheloc'h.

Mat, ur blijadur a souezhadenn eo bet din merzout e oa dija, e touez an dud deuet tri hag a oa a live uhel a-walc'h ha daou pe dri all o doa dispa- ket testennoù studiet aketus.

A-bouez menegiñ ivez e oa ouzhpenn ar pezh e oan o c'hortoz. Anat deoc'h ez eus bet kavet tud da zispakañ "Yann ar Paotr Mat" Paotr Treouere. Met re all o doa skrivet, pe empen- net penna da benn o istor. Ha ma n'oa bet douetañs ebet evit ar priz kentañ an devezh-se, justik oa bet etre e an eil hag an trede. Tud, an tri-mañ, a zeue brezhoneg eus ar c'hentañ gan- to.

Abaoe e selouan aketus, hag e sonskrivañ ken aketus all an istorioù priziet a glever da Sul da noz e abadenn vrezhoneg Daniel Jekel war R.B.I. Bammet e choman gant an ampartiz, ar birvilh, an dudi a gaver evel- se.

Soñjal a c'hellfed e oa peuzvarva, pe gwall doc'hor arz ar c'hontañ rimadelloù e-touez an dud. Sklaer eo, n'oa ket dav c'hwezhiñ kalz war al ludu, evit d'an tantad kregiñ a-nevez. Tud ijinus a zo, a zo un dudi, ur sebez a-wechoù klevet ar brezhoneg a red diouzh o muzelloù, hag an istorioù. Muioc'h a dra- ou farsus a glever met estreg- to 'zo.

Ne garfen ket re bezañ bet e-touez barnerien ar genstrivadeg vras, en Oriant, rak start kenañ e oa barn. N'eo tamm ebet evel barn meur a son- ner o seniñ ar memes ton, ar pezh a zo diaes dija. Penaos

KAER

lakaat en ur geñver istorioù farsus ha reoù skrijus ? Penaos dreist-holl, kaout ur strollad barnerien da zegouezhout gant reolennoù diaez ar genstriva- deg ? Soñjit 'ta eo sañset d'an dud vat-se intent, ouzhpenn ar galleg, ar brezhoneg, na petra 'ta, hag ar galleg. Hag evit bezañ reizh e vefe dav intent kement rannyezh pe dost (met e- vit lavaret gwir, ul lastez yezh lennegel un tamm eo dija hini ar gonterezh, zoken evit istorioù farsus, gant kalzik tud).

Membra, se 'ra kalz a berzhioù divoutin en un den. Ha penaos barn reizh etre un istor a vez komprenet ervat he arlvioù ha munudigoù he fent, hag unan all na vo nemet dam- gomprenet pe braskomprenet ?

Penaos ivez lakaat tre en ur geñver ar modoù istorioù di- sheñvel a oa da glevet ? Tud zo a gontet brav tre met o istorioù o doa klevet digant re all. Tud all, er c'hontrol, e oa anat e oa bet empenet, frammet penna da benn o istor ganto o unan, ar pezh a gontan me trec'h d'ar re gentañ. Met pet danvez bar- ner a anavez mat a-walc'h ar gonterezh vrezhoneg a-gozh evit gouzout evelse ar pezh a oa ne- vez hag ar pezh n'oa nemet as- tommet, forzh pegen pitilh e vefe gant restachoù.

UR GOULENN

A-raok ober anv eus da- zont ar genstrivadeg-mañ e kar- fen ober ur gouleñn sklaer. Sonskrivet aketus eo bet ar



c'hontadennoù, da vihanañ war lerc'h ar rak-choaz war vent ar c'hantoniou (ha c'hoazh tre- met e oa eno hep sonskrivañ traoù a dalvoudegezh dija) gant Radio Breizh Izel. Kement-mañ da vihanañ o deus graet. Ha set

(c'hwil oar... an abadennoù ni- verus-se ma vezer lakaet da genstrivañ ma vez roet d'ar go- nezer levr pe bladenn).

D'am soñj e vefe un tamm



Adstagañ gant un hengoun, Aar Bras o tastum kontadennoù Marc'harid Fulup.

ar pezh a glever abaoe da Sul da noz, hag un drugar eo.

Evel den troet gant va Bro, evel brezhoneger, evel ke- lenner brezhoneg ivez, e karfen e vefe graet kasedigoù eus ar c'hontadennoù-se, adsonskrivet eta. Ar gwellañ pezh a vefe 'vefe embann anezho asambles gant ar skrid (e doare KONZ, em- bannet gant DASTUM), hag evelse e vefe ur sikour dispar evit ar c'hellen.

Met ma kaver re zises da ober (ha padal n'eo ket... N'eo ket re labourus, me 'zo kontant da gemer va lod el labour skri- vañ an istorioù-se, da vihanañ evit ar rannyezhoù brezhoneg a gompren ervat) e vefe brav dispar pa ne ve ken embann ar c'hasedouegoù.

Ne goustfe ket kalz ar- c'hant, gwerzhet e c'hellfent bezañ aes awalch, d'am soñj, ha roet e c'hellfent bezañ e- giz "prizioù" war ar radio

brav a fred dezho gant ober e- velhen : embann bep a gasedig warnañ istorioù en ur rannyezh hepken. Lakomp ur c'hasedig gant istorioù e brezhoneg Leon, unan e brezhoneg Treger, unan hini traoñ Kerne, unan e brezhoneg ar Menezioù, hag unan pe zaou, da vihanañ, e gwenedeg. Ha kement-all evit ar rannyezh- zhoù galleg.

Kement-mañ ivez a vefe un testeni dispar hag, adarre, ur benveg eus ar re dalvoudusañ da sikour an dud da beurzeskiñ brezhoneg, da gompren ar rann- yezhoù all, hag ivez, na petra' ta, da gaoz plijadur.

Señ a rafe ivez tro, ma vefe graet ar genstrivadeg a- nevez d'an danvez kenstriverien da velet ar mod traoù a zo bet priziet, gant lakaat da reolen- eo arabat implijout ken an is- torioù kontet dija. Kement-mañ a vroude ijin tud'zo, rak ijin a zo war ar poent-mañ ha ne vez ket kavet nemeur a fred dezhañ.

KONTADENNOU

UR MENOZ KAER

KENSTRIVADEG CMB-RBI



Pa lavaran un testeni, soñjit e vefe evelse gant un hanter zousennad kasedouigoù un testeni przius eus koulz lavaret an holl rannyezhoù brezhoneg, da vihanañ ar re a vez implijet un tamm mat c'hoazh. Dres ar pezh am boa klasket ober gant ar raktres sonskridaoueg em boa anvet KOMZ hag a zo choemet da lagenniñ, ken difonn ma teu da z-DASTUM embann an eil niverenn war lerc'h eben.

-fe da lakaat ivez war ar c'hasedouigoù a vefe embannet, ne gav ket din e vefe koll oc'h ober. Radio Breizh Izel ne goll -fe ket kennebeut, ha danvez o abadennoù a c'hounez evelse forzh pegement, ha ma vefe embannet kasedouigoù o defe prziou "graet er gêr" da reiñ, a-hardiezh.

Sevenadur ar vro ne vefe ket war goll, er c'hontrol. Reiñ buhez en dro d'ar gonterezh, ar pezh a sinifi ar gonterezh e brezhoneg dreist-holl e Breizh Izel, a rofe plijadur da galz tud, a vroudfe ar re ijinnus da ijinañ, ha tro o defe an deskidi da wellaat o brezhoneg en ur labourat war an istorioù peogwir int berr er peurliesañ.

Ur c'hinnig bennak all a rankan da ober memestra, anat dija marteze, diouzh ar mod

"pismigerezh" a raen bremaik. Ret e vefe kaout da vihanañ daou briz bras disparti : unan evit ar brezhoneg, unan evit ar galleg (ha marteze unan evit ar heilfer zoken. Moaien vefe ivez reiñ prziou disparti evit an istorioù a-gozh hag an ijinnadennoù nevez.

Ur c'hinnig all ivez : perak n'oa urzh da genstrivañ nemet d'an dud tremen 55 oad dezhe ? Un dra vat kenañ, sur, met konterien yaouankoc'h a zo.

Met ma vefe dalc'het evel m'emañ dija, ha graet pep bloaz e vefe mat kenañ dija. Gwelloc'h c'hoazh ma vefe embannet an istorioù, e stumm kasedouigoù. Ha dispar eta ma vefe embannet da heul ar c'hasedouigoù ar skrid anezho.

Ha ma 'z eo nec'het ar C.M.B. evit kas war-raok an embann-se, feiz, kontant da sikour on.

Mikael Madeg.

AMZER 'ZO

ECHU GANTI

Serret eo DALED Brezhonegerien Roazhon, "AMZER 'ZO", a oa digor abaoe miz Here diwezhañ. Arc'hant a vanke da baeañ tri miz feurm an Hañv, d'ar c'houlz ma ne vez mui kalz buhez e kêr. Douast ma veze leuniet ar salioù pa veze aozet un abaden bennak, ne zeue ket ingal a-walc'h brezhonegerien ar vro da reiñ buhez d'an Oaled ... E miz Gwengolo e vo studiet adarre ar pezh a c'hallo ar gevredigezh a vere an Oaled aozañ.

Seizh Avel
ostaleri
KONFORT
22 PRAD

NUKLEEL

BEC'H EN DRO D'AR C'HARNED



Et re Naoned ha Sant-Nazer en Hanternoz d'ar stêr Liger emañ Ar C'harned, al lec'h dibabet gant E.D.F. da sevel ur greizenn nukleel, gant asant holl strolladoù politikel Bro-Naoned, nemet U.D.B. Emgann hag ar re C'hlas hag ar C.F.D.T

an eil gwech er bloaz-mañ), hag e ranked ehanañ kreizenn Cattenom... dizañjer ha marc'had-mat pa larer deoc'h !

katalaniz a oa deuet memestra ivez evit lavaret ne oa ketan nukleel hep dañjer.

Bloaz goude TCHERNOBYL, emzalc'h ar stadoù n'en deus ket cheñchet : kevezerezh evit ar galloud, an arc'hant en desped d'ar vuhez ha d'ar furnez.

Elen Gwennog

- ===== SINADEG =====
- = Ur petition a zo da sinañ =
- = evit stourm a-enep =
- = Kreizenn ar C'harned =
- = Ma fell deoc'h skoazellañ =
- = tud ar Vro, skrivit da : =
- = R. DROUET =
- = 68, straed Du Landas =
- = Sant Yann Boiseau =
- = 44640 AR PELLERIN =

MANIFESTADEG ENEP NUKLEEL E PARIS

Betek ar 17 a viz Gouere e vo un enklask war an dalvoudegezh evit ar foran e 10 parrez bennak. D'ar 27 a viz Even, diouzh ar beure, eo bet laeret kaer an enklask e ti-kêr Bouae gant un 40 stourmer enepnukleel. Bec'h gant ar armerien : taolioù, grenadoù-daerou, ha seitek stourmer dastumet gant Paotred Mari Robin.

r Vretoned a zo aet niverus a-walc'h da b-Paris d'an 20 a viz Even diwezhañ d'ar vanifestadeg enep nukleel evit EUROPA a-bezh. Ar vanifestadeg hec'h unan n'he deus ket graet kalz a berzh : 10 000 a dud en holl. Un nebeut alamanted, italianed, belgiz,



bremañ 17

AFRIKA AR C'HREIZTEIZ

POUEZAN WAR



Pep hini a oar moarvat bremañ petra eo an apartheid, ar sistem politikel ijinet gant an trevadennourien gwenn en Afrika ar C'hreisteiz evit derc'hel ar galloud evito hepken.

"APARTHEID" a zo kement ha "disrann" (ar "ouennou"). En Afrika ar C'hreisteiz e vezer kerent ha ganet, rannet hervez e "ouenn". Neb a c'han "du" n'en devez gwir politikel ebet.

Ar re zu a zo diskleriet dezho bezañ keoded ar bandoustan : 10 tachenn douar 13 % eus ec'honder ar vro anezho ha 25 milion a dud du enno, kement ha 73 % eus an holl poblañs.

PETRA EO AN



.3 milion hanter a dud du kaset dre nerzh er bantoustan dindan 20 vloaz,

.9 milion a dud du rediet da vevañ e-barzh ghettoioù ar vro "wenn" : an "townships",

.an disrann hollek evit kement tachenn eus ar vuhez : al lojeiz, an deskadurezh, ar yec'hed...

.22 % eus an arc'hant gouestlet d'an deskadurezh evit 73 % eus ar poblañs (7 gwech nebeutoc'h evit ur bugel du eget unan gwenn),

.1 mezeg evit 330 gwenn, hag 1 evit 12 000 du,

.10 % eus ar vugale du a varv araoek an oad a 1 bloaz (2 % eus ar re wenna),

.Lezennou gwask a gustum aotreañ bac'hañ tud n'int ket bet barnet ken pell ha ma karer

.An arme oc'h aloubiñ bepred an townships ha skolioù ar re zu.



PETRA OBER ?

Gwelet a ra mat ar re a zo e penn an emsav du en Afrika ar C'hreisteiz ne c'hell treuzvevañ an apartheid nemet gant sikour ar broioù estren. Ar pep brasañ diouto a c'houlenn eta digant ar broioù-se boikotiñ ar sistem e pep keñver.

Desmond TUTU, arc'heskob ar C'hap a lavar e-unan : "N'eus ken nemet ar gwask etrevroadel a c'hellfe saveteiñ ar hanomp". James MOTCASI, Prezidant sindikat ar meingleuzerien du a lavar : "Boikotiñ ne c'hell ket ober a zroug deomp rak n'hon eus netra".

Setu perak un toullad aozadurioù ha personelezhioù o deus divizet reiñ lañs d'ur prantad stourm evit m'en em dennfe ar gompagnunezh TOTAL-CPP eus Afrika ar C'hreisteiz hag eus Namibia.

Afrika ar C'hreisteiz n'he deus ket a eoul-mañ : aze emañ he zalc'h pennañ. Ne teu a-benn daoust d'an embargo war ar petrol nemet dre genwallerezh kompagnunezhioù evel TOTAL hag a asant lezennou an Apartheid.

Goulenn da gentañ ha skrivañ neuze da : FX.ORTOLI, PDG TOTAL - CFP, 5 ru Michel Ange - 75781 Paris cedex 18 - o reiñ da c'houzout e c'hellfe bezañ levezonet kenañ emalc'h kliented TOTAL amañ er vro ken kas n'en em sachfe ket TOTAL eus bro an apartheid.

Da gaoz reiasadurioù e c'heller skrivañ da : Mouvement anti-apartheid B.P. 109 - 75463 Paris cedex 10 - pgs : 47.70.29.08.

J.K.

BREZHONEG

DANVEZ RET ER 6^{VET} KLAS

UN TAOL-ESA E KEMPER

E-kers ar bloavezh skol 86/87 ez eus bet kente-lioù brezhoneg ret e 6^{vet} klas ur skolaj e Kemper. An danvez "brezhoneg"-se ne oa ket "brezhoneg-yezh" met kentoc'h un eurvezh bep sizhun da zeskiñ petra 'oa ar brezhoneg. Rak an darn vrasañ eus ar skolidi ne ouient netra diwar-benn ar brezhoneg, hag int-i kemperiz... Gouest e oant da lavar o soñj a-zivout ar yezh evel just : yezh ar re gozh ha yezh ar beizantad dreist-holl. Met ne oa ket sklær tamm ebet en o spredoù.

Daou glas a oa bet dibabet evit an eseadenn-se (10 klas 6^{vet} a zo er skolaj). Evit ar c'hlas kentañ, lakaet eo bet an eurvezh brezhoneg d'ar Sadorn da 9 eur, ha ret eo bet d'ar skolidi sevel un eur abretoc'h bep Sadorn vintin... Displijus spontus.

Evit an eil klas, lakaet eo bet an eurvezh da 10 eur bep Sadorn, d.l.e. da eurvezh zivezhañ ar sizhun... Ne oa ket plijusoc'h d'ar skolidi. E gwirionez, na welit ase youl ebet da stourm a-enep d'ar brezhoneg a-berzh tud ar skol : kalz re zivezhat e oa erruet an aotre da aozañ ar c'hentelioù-se. Echu e oa kompenn implij-amzer ar skol, ha lakaet eo bet an abadennoù lec'h ma chome toullou



en implij-amzer.

E diwezh ar bloavezh am boa roet goulennoù d'ar skolidi o doa bet brezhoneg ret. Setu, berr ha berr, o respontoù :

-o zud a-du gant kente-lioù brezhoneg er skol : 57,5 %, o zud a-enep d'ar c'hentelioù : 35 % (e-touez an dud a oa a-enep, an 3/4 anezho o doa difennet ouzh o bugale mont

d'an abadennoù !), o zud-kosh 2 war 3 a oa a-du, 1 war 3 a oa a-enep, o mignoned a-oad ganto: 1 war 5 a-du, 4 war 5 a-enep.

-Ar skolidi o-unan : e derou ar bloavezh ez eus bet 25 % a-du ha 72,5 % a-enep, e diwezh ar bloavezh e oa 47,5 % a-du, ha 52,5 % a-enep...

-Levezon an dud a oad gour war o bugale :

Tud ar skolidi	Skolidi derou ar bloavezh	diwezh ar bloavezh
A-DU	A-DU	25 %
A-ENEP	A-ENEP	47,5 %
A-DU	A-ENEP	45 %
A-ENEP	A-ENEP	37,5 %
A-DU	A-DU	30 %
A-ENEP	A-DU	15 %
		0
		0



Setu ar sifroù, ez kriz, hep din klask tennañ netra deus outo. Ganto e vefe tu moarvat da ziskouez petra a vefe da ober, ha petra a vefe da c'houlen. Da skouer :

Er 6^{vet} klas, petra a vefe ar gwellañ ? Un eurvezh bep sizhun, da ober anaoudegezh gant ar yezh, dre ret, ha petra a vefe klasket ober er c'hentelioù-se ?

Un eurvezh pe ziv brezhoneg-yezh, dre zibab, evit deraouidi. Ha petra a vefe klasket ober er c'hentelioù-se ?

Pe an daou ? Ha goude,

petra ober er 5^{vet} klas ?

Poent diamp gouzout petra a glaskomp ober, gouzout pere eo hor palioù kelenn, gouzout da beseurt tud emaoep o kinnig hor yezh da zeskiñ pe da ober anaoudegezh ganti.

N'eo ket bet embannet kalz a dra war ar c'hudennoù-se -ken e chom alies diaes d'ar gelennerien war ar brezhoneg gouzout petra a c'hortoz ar skolidi eus o c'helen, ha petra kinnig da gelen. Piv en dije kinnigoù da reiñ ?

Roland Hogn

POBLLAZHADeg

AN ARMENIZ

1915

A et eo ar gouarnamant turk e fulor e miz Mezheven pa 'z eus bet votet e Parlamant Europa an destenn diarbenn pobllzhadeg Armeniz e 1915. Kinniget e oa an destenn-se gant Jaak Vandemeulebroucke, kannad broadelour flandrezat, ha skoazellet eo bet gant ar gomunourien, ul lodenn eus ar sokialourien ha tud zo eus an tu dehou.

En destenn-se e lavarer "n'eo ket kiriek ar gouarnamant turk a-omant eus ladhadeg Armeniz 1915" pa oa bet lazhet milionoù a Armeniz gant an Durked. Met lavarout a reer ivez ne c'hello ket ar Stad durk dont e-barzh ar Gumuniezh Euro-pat keit ha ma kendalc'ho, evel ma ra bremañ, da nac'h ez eus

bet eus ar pobllzhadeg-se, keit ha ma ne anavezot ket ez eus ur gudenn armeniat, ha keit ha ma nac'ho ivez ar vroadelezh kurd e Reter Turkia.

Setu neuze ar Stad Turk kondaonet evit an doare ma ra gant he "minorelezhioù", laouen an Armeniz o chom en Europa ha displijet-kaer ar gouarnamant turk a ra "gouennelourien" ha tud "di-atebek" eus ar Gannaded Europat, tud hag a rofe o skoazell, gouez dezhañ, d'ar "spon-terien armeniat da zont".

Goullenn : ha disheñvel e vefe emzalc'h ar Stad C'hall ma vefe kaoz e Parlamant Europa eus Breizh pe Gorsika ?

Iwan Kadored



I.K.

TOURISTED

SPONTET

K elouet hor bet war ni-verenn miz Even Bremañ e oa bet implijet gant aozerien "Gouel ar Gelted" 5 yezh evit brudañ ha skignañ roll an abadennoù. 5 yezh, met brezhoneg ebet ! Klevet ez eus bet gant unan eus aozerien ar gouel p'eo bet goullennet perak ne oa ket bet lakaet brezhoneg war ar follennoù bruderezh : "Il faut nous comprendre, nous ne voulons pas effrayer les touristes". Ur yezh "terrorist" eo deut da vezañ ar brezhoneg e-pad an Hañv ?

Skrivit evit klemm da : Komite Gouelioù an Oriant - Ti-kêr - 56100 - AN ORIENT -

KELTIA

TRAMOR

GOUELIOU AN ORIENT

V otin'ha rae an dud e Breizh Veur hag en Hanternoz Iwerzhon d'an 11 a viz Mezheven da zilenn o c'hannaded e Ti ar C'hunioù e Londrez. Trec'h eo bet, ur wech c'hoazh, ar Virourien, ha kenderc'hel a ra Margaret Thatcher da vezañ Kentañ Ministr ar Stad. Met kollet o deus un toullad sezioù memestra, dreist-holl e Bro Gembre hag e Bro-Skos. Er broioù-se eo aet war-raok ar vroadelourien. Plaid Cymru (Strollad Broadel Kembre) hag ar SNP (Strollad Broadel Bro Skos) o deus bremañ bep a dri c'hannad e Londrez, e-lec'h daou a-raok.

Gant kiladenn ar Virourien e Bro Skos (10 sez diwar 72 e-lec'h 21) e klevet komz a-darre eus sevel ur Parlamant skosat, goullennet gant ar strolladù saoz all ha gant ar vroadelourien. Da vezañ gwelet eta...

En hanternoz Iwerzhon eo aet war-raok ar Strollad Broadelour Klour, an S.D.L.P., o tapout tri sez an ivez e-lec'h daou, tra m'en deus gallet Gerry Adams, rener Sinn Féin, mirout e hini e Belfast.

TEZENN

STAJ HANV OKITANEG

EVIT' AR VUGALE

W ar a seblant ez eus bet aozet evit ar wech kentañ ur staj Hañv okitaneg e-vit bugale o komz okitaneg. E-pad an hañv diwezhañ e oa bet anezhañ : e miz Gouere 86, e Sabras (e departamant Lanneier Gwaskogn) en ul lec'h plijus, gant guez pin e-leizh. Ouzhpenn 30 bugel (eus 7 betek 14 vloaz) a gemeras perzh ennañ ; komzet e voe okitaneg outo en ur la-kaat anezho da ober traoù a vezer boaz da ober e-pad seurt stajoù-vakañsoù (da skouer : tennañ gant ar wareg, gant ur garabinenn, c'hoariva, keginañ, mont war varc'h, tresañ...).

Heñvel a-walc'h e oa eta ouzh stajoù OALED DIWAN. Ul le-vrig a zo bet embannet gant rener ar staj (Eric Rolet - 64 a-venguda de la republica - 33200 Bordô) hag a c'hell bezañ goullennet digantañ.

Evel ma skriv Eric ROLET en e levr : " Saveteñ an Okitaneg eo hor pal eveljust ; ne fell ket daomp auz e vefe ur yezh-studi nemetken : ur yezh vev a rank bezañ, evit ar "muhez o vevañ"... "

Bernez Kadored

TEZENN

D 'an 22 a viz Mezheven eo deut Erwan Evenou "da zilenn e dezenn", e-giz ma lavarer e Skol Veur Breizh Uhel dirak ur juri anañ Yann an DJ, kelenner e Skol Veur Brest, Per Denez, kelenner e Skol Veur Roazhon 2, J.Yves Urien, mestr-konferansoù e Roazhon 2 Breizh Uhel, Humphrey Humphreys, eus Skol Veur Kembre. Diwar-benn brezhoneg Lannijen e oa labour E.Evenou, hag unan eus ar re

startañ e oa, peogwir e kinnige un analiz fonologel eus ar seurt brezhoneg-se, ken disheñvel e framad diouzh hini Bro Leon ha hini Bro Wened.

Dav eo kaozot soñj ivez eo bet Erwan Evenou unan eus ar 5 "kapesian" kentañ degemeret war -lene evit ar brezhoneg. Ar meeg uhelañ a c'heller kaozot(*) d.l.z.-a zo bet roet dezhañ gant ar juri.

(*) enorus-meurbet

BEAJOU STUDI

A baoc 1983, emañ Komision Kumuniezhoù Europa o kinnig ur program beajoù studi e kembour gant Burev pennañ ar beajoù-se a zo studiañ frammoù kelenn, sevenadurel pe mestraturel ar yezhoù ha sevenadurioù broioù bihan Europa.

An dezverk pennañ evit bezañ dibabet a zo hervez ar pezh a c'hello degas an dud dibabet evit kas pelloc'h war-bihan. (Bez e c'hellont bezañ eta, kelaouennerien barrek war an danvez-se, kelennerien, stum-merien, klaskerien, ...).

A-stroll e vez aozet ar beajoù-se, padout a reont ur sizhunvezh, ha roet e vez ur yalc'had a 5000 lur war-dro gant ar gomision. Reoù ar bloaz -mañ a ranko bezañ graet a-benn ar 1añ a viz Here 87 d'an dwezhatañ. (*)

Dibab an teulidoù o vezañ graet e penn kentañ miz Even 87 e ranker o goullenn buan digant : Kenurzhierzh Sevenadurel Breizh - Diwan BP 22 - 29214 LANNILIZ - 98/04.05.42 -

(*) Gres (minorelezh Albania), Bro Gembre (Aberystwyth), Bro C'hall (Korsika), R.F. Bro Alamagn (Schleswig), Italia (Friulu, Venezia Giulia), Spagn (Bro Euskadi).

STAJOU

DEVEZHIOU KRISTEN

ETREKELTIEK

E us ar 15 d'an 22 a viz Eost en em gavo a-gevret Kristenion brezhonegerion ha kristenion eus ar broioù keltiek all e KERPRAD, e-kichen Gwengamp, da geñver devezhoù-studi aozet gant ar gevredigezh "Kristenion Breizh", a vod laiked ha beleien evito da vevañ o Feiz e brezhoneg.

Danvez an devezhoù-se eo displegañ pegen a-bouez eo e vefe doujet ouzh yezh an dud, zoken ar re bihanaet a-ratozh gant ar stadoù, hervez ar vuhez-gezegh kristen, ar pezh n'eo ket anat atav gant darn vrasañ ar gristenien ha penadurezhioù an iliz ar broioù keltiek, hag e Breizh peurgetket.

Studiet e vo dre vras an Istor : penaos eo bet distrujet yezhoù "zo hag an holl broaderezhioù kristen gant ar stadoù e Kornog Europa. Roll an iliz er c'henver-se, ha penaos emañ kont hiziv an deiz er broioù keltiek.

Degemeret e vo ez-ofisiel ar Gelted Tramor gant ti-kêr Wengamp d'al Lun 17 d'abardaez. titourou : pgz 99/ 07.85.03.

TREMEN HENT BREIZHEK

Embannet eo bet, gant kevredigezh AN DAOL GRENN Bro-An Alre ha Bro-An Oriant, un Tremmen-Hent Breizhek savet diwar skouer an hini ofisiel implijet en Europa. Divyezhek eo, da lavarout eo brezhoneg-saozneg, ha bez ez eus un ugent pajenn bennak e-barzh.

Ouzhpenn ar pajennoù implijet gant ar velestradurezh ez eus ur gartenn a Vreizh, ur follenn gant darvoudoù pouezusañ hon Istor ha "Bro gozh ma zadou" e-barzh. (35 lur eo ar priz, 23 lur eo adalek 10 skouerenn.) Da vezañ goullennet gant AN DAOL GRENN - Conenanchoù - 29130 - GLEGGONVARCH -

(tremen-hent = passeport)

ETRE DEC'H HAG ARC'HOAZH

GANT FRANSEZ FAVEREAU

Ur pennad goude e laras d'e vreur-kæer :
- "Me an eus c'hoant distreiñ (distroñ) bremañ d'ar ger"
- "Distreiñ d'ar ger ! Ha da betra ?"
- "Da weled ma zud, ha da vevañ gante"

AN UHEL kontet gant Frañsez an Ewen, gwreg Tregoat, en parrez Pederneg, 1868



"Un dez, en mis Eost, e oa oc'h aosañ evid lein an dornierion, pa zegouzas unan 'barzh an ti hag a c'houlennas diganti : Ma c'hemer a rafet da bried ?" (trestadenn Reun AN HONDEG)

Un toullad mat a levrioù-deskiñ a zo bet savet evit ar brezhoneg, an holl o plediñ gant ar bloavezhioù kentañ avat -Pa n'em gave ar c'helenner gant krennarded bet desket ar yezh gante er c'hlasoù kentañ pe bet un tañva anezhi er gêr zoken e oa start kaout danvez kelenn e brezhoneg ha ret mat e oa dezhañ pleustriñ hardiz war an dachenn, dezhañ da aozañ kentelioù.

Ha setu, graet e soñj gantañ embann an danvez-kelenn bet prientet gantañ tamm ha tamm kement ha lakaat ar re all d'ober o mad eus e skiant-prenet.

Divalav e kavan golo al levr avat, pouezus eo golo ul levr koulskoude, drezhañ e c'hell bezañ denndet skolidi gant ar yezh. Re mod kozh eo, ha perak lakaat d'ur c'hrennard penn un den 30 vloaz ?

Meur a lodenn a ya d'ober al levr. Tud ha traoù : danvez a bep seurt a zo, e-touez an traoù gwellañ a gaver el levr.

Yann Pennhaleg

Aes e vo lakaat ar skolidi da gomz war ar vuhez a-vremañ. Un tech fall koulskoude:

N'eo ar vuhez-mañ nemet hini an dud war ar maez pe war an aod. Diaes a-walc'h e vefe d'ur c'hrennard o vevañ e Brest pe e Roazon en em gavet gant e vuhez dezhañ !

Kavet e vo ivez pennadoù tennet diouzh pezhioù c'hoari, kanaouennoù, gwerzioù, marvailhoù... Un diverrañ eus program Istor ar pevare klas evit ar pezh a sell ouzh Breizh da vianañ. Displeget e vez ar gerioù diaes, ar poentoù yezhadur heverk a vez kavet er pennadoù, goulennou a vez savet hag an dra-se a vo ur skoazell d'ar c'helenner, dezhañ e vo da bleustriñ evit lakaat ar skolidi da gaozeal, ha danvez a zo!

An tri-c'hard eus al levr a ya d'ober kanaouennoù ha mojennoù kozh, re eo marteze, re droet war an amzer dremenet en em gav al levr. Keñveriañ a c'heller ober gant un dastumadenn testennoù a oa bet savet gant Fañch Broudig e 1981. Ne oa ket displeget antestennou, evit tud koshoc'h e oa ivez, gwir eo, met danvez a-vremañ a oa bet kavet : nukleel, petrol, an adlodennañ, an dilabour, ar broioù estren, jazz, ...

Gwelloc'h e vije bet al levr sur mat ma vije bet kavet pennadoù eus ar seurt-se ivez. Pa e meur gant ar rebechoù e c'hellfe bezañ bet gwelloc'h an doare moulañ o tispertiañ ar pennadoù gant lizherennoù disheñvel.

Ul labour brav eo avat hag o c'hortoz kement-all e oad abaoe pell'zo. N'eo ket achu al labour avat. Kement all a vije d'ober evit an eilvet klas, ar c'hentañ klas hag an hini diwezhañ.

(Etre dec'h hag Arc'hoazh - embannet gant Skol Vreizh).

LEVRIOU BREMAN

STUDIAN PARREZIOU AR VRO

EUS AN EIL KAOTERIAD

GANT ERWAN VALLERIE

D'EBEN

Dont a ra mare ar vakañsoù ha tro a vez da lenn levrioù chomet o c'hortoz war an estajerennoù... Ne oa ket bet moneget ganeomp levr Erwan Vallerie "Communes Bretonnes et paroisses d'Armorique" pa oa deut e-maez e fin ar bloaz paseet. Gwir eo ul levr da lenn pizh eo ha degouezh a ra mat mare ar vakañsoù evit-se.

Kas a ra ac'hanomp da studiañ milved kentañ Istor Vreizh. Ur mare chomet en deñvalijenn allas met ober a ra e vad Erwan Vallerie eus an dielloù kozh hag ar c'havadennoù nevesañ evit sevel un daolenn eus rouedad ar parrezioù a veze kavet e Breizh d'ar c'houlz-se.

Vreizh eo ivez, petra oa o darrempredoù gant an arvorikaned romaneket mui pe vui a-wechoù hervez al lec'hioù.

Sklaer e weler n'eo ket lec'havadurezh Breizh ul lec'h-anvadurezh brezelourien, ma 'zo bet krogadoù etre ar Vretoned hag an Arvorikaned ne oant nemet krogadoù lec'hel ha diazezet e oa bet ar Vretoned a-bell, heñchet ma oant bet gant ar Romaned evit difenn an Arvorig a-enep d'ar Saizon hag ar Wizigoted. Pa vo brezelioù e vo etre an Arvorikaned hag ar Vretoned diouzh un tu hag ar Franked diouzh un tu all.



C'hoarioù nerzh deiz ar Pardon. Ar Pardon a chom c'hoazh un doare da stankaat al liammoù er gumuniezh.

Ar barrez a zo ur gumuniezh kozh ha bev, dre ar gouelien hag ar pardonioù e weler kement-se, ur gumuniezh brasoc'h evit ar "genedl" pe ar Pluiv a oa anv ar barrez e brezhoneg kozh e-lreizh a stummoù plu, gaver an deiz a hiriv plou, plebs e teu ar ger-mañ hag heñ-kavet e Italia an "pieve" a vez e Korsika. "Pobl" ur sant eo, ur sant diazezer e gwirionez. rannet, penaos penaos eo bet penaos eo aet da get a-wechoù ar kudennoù kentañ a zo unan eus c'hel e Breizh.

Un doare da gompren penaos eo deut ar Vretoned da

Enklaskoù Erwan Vallerie a zo bouez bras evit digas sklerijenn war blas ar Vretoned e Bro Naoned. Kornog ar vro-se a zo merket kalz donoc'h gant anvioù brezhonek eget na vez Bro Roazon pe Reter Aodoù an Hanternoz lakaomp. E Bro Wentrann pe e paludoù ar Briere e vezer e Breizh lzel koulz larret. Betek nevez 'zo e oa chomet brezhonegerien e Enez-Vaz.

1650 anv zo bet studiet gant Erwan Vallerie. Ur mell labour eta a zedenn kement hini a vez interest gant Istor Vreizh met gant istor e barrez ivez... ("Communes bretonnes et paroisses d'Armorique" gant Erwan Vallerie embannet gant Editions Beltan).

Deut KAOTERIAD, an dastumad danevelloù nevez, a-zindan ar wesk, goude ma ne vo bet nemet 9 den o kemer perzh ennañ, bout ma oa bet kaset un 50 lizher-kouviñ bennak

Daoust ma ne ray ket lod o begoù figus gant al levr 1añ a lennegezh o kont er-maez hevlene (e miz Mezheven !) hon eus kavet e oa bet dozet re a vior gant ar goukoug (pediñ a reomp ar skrivagnerien d'hon digareziñ) : brezel a vo graet dezhi ha dezho ar c'hentañ tro.

Rak kinnig a reomp adarre sevel ur gaozeriad all, war un danvez all, MUNTR an dro-mañ. Gortoz a reomp ho skridoù abenn Nedeleg, evit ma c'hellfent bezañ moulet a-benn miz Mezheven 1988.

Goulenn a raimp ar wech-mañ diganeoc'h kas diamp div skouerenn BIZSKRIVET eus ho skrid-ou, (alliañ a reomp deoc'h mirout ur skouerenn all). Ar skridoù na vent ket bizskrivet a vo lennet evel ar re all met ne vint ket dibabet : n'omp ket evit kemer al labour-se ouzhpenn.

Evel en dro gantañ e vo kenlabour hag eskema etrezomp, kenembannerien, hag ar skrivagnerien. Spi hon eus e viorc'h niverusoc'h en dro-mañ hag e vo fonnusoc'h, ha saourusoc'h a-se ar GAOTERIAD a vo kenfardet gantimp.

M.Kerrain -50 ar Mailh -Roazon-A. Botrel -4 stradaed St Varzhin dor C - 35700 - Roazon -

KAOTERIAD advertisement with a small illustration of a person.

LEVRIOU

bremañ

ETRE DEC'H HAG ARC'HOAZH

GANT FRANSEZ FAVEREAU

Ur pennad goude e laras d'e vreur-kæer :
 - "Me an eus c'hoant distreiñ (distroñ) bremañ d'ar gêr"
 - "Distreiñ d'ar gêr ! Ha da betra ?"
 - "Da weled ma zud, ha da vevañ gante"
 - "Med paourkaezh, pemp kant vloaz so (zo) abaoe ma 'z out amañ ! Da oll gerent zo marv pell zo, hag e-lec'h ma oa da di, zo bremañ ur wenn (gwezenn) derw vras brein gant ar gozhni."

AN UHEL kontet gant Frañsesa an Ewen, gwreg Tregat, en parres Pedernez, 1868



AN HONSEG

"Un dez, en mis Eost, e oa oc'h aosañ evid lein an dormerion, pa zegouzas unan "barzh an ti hag a c'houlennas diganti : Ma c'hemer a rafet da bried ?" (Tressadenn Reun AN HONSEG)

Un toullad mat a levrioù-deskiñ a zo bet savet evit ar brezhoneg, an holl o plidiñ gant ar bloavezhioù kentañ avat -Pa n'em gave ar c'helenner gant krennarded bet desket ar yezh gante er c'hasoù kentañ pe bet un tañva anezhi er gêr zoken e oa start kaout danvez kelenn e brezhoneg ha ret mat e oa dezhañ pleustriñ hardiz war an dachenn, dezhañ da soañ kentelioù.

Re vat e oar kement-mañ Frañsez Favereau pa ra skol vrezhonek abaoe bloavezhioù e Karaez da zigenañ hag e Montrouleze goude-se.

Ha setu, graet e soñj gantañ embann an danvez-kelenn bet prientet gantañ tamm ha tamm kement ha lakaat ar re all d'ober o mad eus e skiant-prenet.

Divalav e kavan golo al levrl avat, pouezus eo golo ul levrl koulskoude, drezañ e c'hell bezañ dedennet, skolidi gant ar yezh. Re mod kozh eo, ha perak lakaat d'ur c'hrennard penn un den 30 vloaz ?

Meur a lodenn a ya d'ober al levrl. Tud ha traoù : danvez a bep seurt a zo, e-touez an traoù gwellañ a gaver el levrl.

Aes e vo lakaat ar skolidi da gomz war ar vuhez a-vremañ. Un tech fall koulskoude:

N'eo ar vuhez-mañ nemez hini an dud war ar maez pe war an aod. Diaes a-walc'h e vefe d'ur c'hrennard o vevañ e Brest pe e Roazon en em gavet gant e vuhez dezhañ !

Kavet e vo ivez pennadoù tennet diouzh pezhioù c'hoari, kanaouennoù, gwerzioù, marvailhoù... Un diverrañ eus program istor ar pevare klas evit ar pezh a sell ouzh Breizh da vihanañ. Displeget e vez ar gerioù diaes, ar poentoù yezhadur heverk a vez kavet er pennadoù, goulennoù a vez savet hag an dra-se a vo ur skozell d'ar c'helenner, dezhañ e vo da bleustriñ evit lakaat ar skolidi da gaozeal, ha danvez a zo!

An tri-c'hard eus al levrl a ya d'ober kanaouennoù ha mojennoù kozh, re eo marteze, re droet war an amzer dremenet en em gav al levrl. Keñveriañ a c'heller ober gant un dastumadenn testennoù a oa bet savet gant Fañch Broudig e 1981. Ne oa ket displeget an testennoù, evit tud koshoc'h e oa ivez, gwir eo, met danvez a-vremañ a oa bet kavet : nukleal, petrol, an adlodennañ, an dilabour, ar broioù estren, jazz, ...

Gwelloc'h e vije bet al levrl sur mat ma vije bet kavet pennadoù eus ar seurt-se ivez. Pa emeur gant ar febechoù e c'hellfe bezañ bet gwelloc'h an doare moulañ o tispartiañ ar pennadoù gant lizherennoù disheñvel.

Ul labour brav eo avat hag o c'hortoz kemend-all e oad abaoe pell'zo. N'eo ket achu al labour avat. Kement all a vije d'ober evit an silvet klas, ar c'hentañ klas hag an hini diwezhañ.

(Etre dec'h hag Arc'hoazh - embannet gant Skol Vreizh).

Yann Pennhaleg

LEVRIOU BREMAN

STUDIAN PARREZIOU AR VRO

EUS AN EIL KAOTERIAD

GANT ERWAN VALLERIE

D'EBEN

Dont a ra mare ar vakañsoù ha tro a vez da lenn levrioù chomet o c'hortoz war an estajerennoù... Ne oa ket bet moneget ganeomp levrl Erwan Vallerie "Communes Bretonnes et paroisses d'Armorique" pa oa deut e-maez e fin ar bloaz paseet. Gwir eo ul levrl da lenn pizh eo ha degouezh a ra mat mare ar vakañsoù evit-se.

Kas a ra ac'hanomp da studianñ silvet kentañ istor Vreizh. Ur maez chomet en deñvalijenn alies met ober a ra e vad Erwan Vallerie eus an dielloù kozh hag ar c'havadennoù nevesañ evit sevel un daolenn eus rouedad ar parrezioù a veze kavet e Breizh d'ar c'houlz-se.

Vreizh eo ivez, petra oa o darmpredoù gant an arvorikaned romanekeat mui pe vui a-wechoù hervez al lec'hioù.

Sklaer e weler n'eo ket lec'hanvadurezh Breizh ul lec'h -anvadurezh brezelourien, ma 'zo bet krogadoù etre ar Vretoned hag an Arvorikaned ne oant nemet krogadoù lec'hel ha diazezet e oa bet ar Vretoned a-bell, heñchet ma oant bet gant ar Romaned evit difenn an Arvorig a-enep d'ar Sazon hag ar Wizigoz. Pa vo brezelioù e vo etre an Arvorikaned hag ar Vretoned diouzh un tu all.



C'hoarioù nerzh deiz ar Pardon. Ar Pardon a chom c'hoazh un doare da stankaat al liammoù er gumuniezh.

Ar barrez a zo ur gumuniezh kozh ha bev, dre ar gouev kement-se, ur gumuniezh weler soe'h evit ar "genedl" pe ar "fañilh vras", an hini eo, zhoneg kozh e-leizh a stummoù gaver an deiz a hiriv plou, pleus e teu ar ger-mañ hag heñkavet e Italia an Hanternoz hag e Korsika. "Pob!" ur sant eo, kompren penaos eo bet rannet, penaos eo chomet, pe parrezioù kentañ a zo unan eus c'hel e Breizh.

Un doare da gompren penaos eo deut ar Vretoned da

Enklaskoù Erwan Vallerie a zo bouez bras evit digas sklerijenn war blas ar vro-se e Bro Naoned. Kornog ar vro-se a zo merket kalz donoc'h gant anvioù brezhonek eget na vez Bro Roazon pe Reter Aod an Hanternoz lakaomp. E Bro Wienn-rann pe e paludoù ar Briere e vezer e Breizh lzel koulz lazet. Betek nevez'zo e oa chomet brezhonegerien e Enez-Vaz.

1650 anv zo bet studiet gant Erwan Vallerie. Ur well labour eta a zedenn kement hini a vez intereset gant istor Vreizh met gant istor e barrez ivez... ("Communes bretonnes et paroisses d'Armorique" gant Erwan Vallerie embannet gant Editions Beltan).

Deut KAOTERIAD, an dastumad danevelloù nevez, a zindan ar wask, goude ma ne vo bet nemet 9 den o kemer perzh ennañ, bout ma oa bet kaset un 50 lizher-kouviñ bennak

Daoust ma ne ray ket lod o begoù figus gant al levrl lañ a lennezh o tont er-maez heylene (e miz Mezheven !). hon eus kavet e oa bet dozvet re a viciù gant ar goukoug (pediñ a reomp ar skrivagnerien d'hon digareziñ) : brezel a vo graet dezhi ha dezho ar c'hentañ tro.

Rak kinnig a reomp adarre sevel ur gaoteriad all, war un danvez all, MUNTR an dro-mañ. Gortez a reomp ho skridoù abenn Nedeleg, evit ma c'hellfent bezañ moulet a-benn miz Mezheven 1988.

Goulenñ a raomp ar wech-mañ diganeoc'h kas dimp div skouerenn BIZSKRIVET eus ho skrid(-où), (alianñ a reomp deoc'h mirout ur skouerenn all). Ar skridoù na vent ket bizskrivet a vo lennet evel ar re all met ne vint ket dibabet : n'omp ket evit kemer al labour-se ouzhpenn.

Evel en dro gentañ e vo kenlabour hag eskema etrezomp, kenembarerien, hag ar skrivagnerien. Spi hon eus e viciù niverusoc'h, ha saourusoc'h a-se ar GAOTERIAD a vo kenfardet ganimp.

M. Kerrain -50 ar Mailh -Roazon - A. Botrel -4 stradaed St Varzhin dor C - 35700 - Roazon -



KAOTERIAD

ELIAN BOUTEL - 1111 BOUTEL - 1111 BOUTEL
 YANN ERWAN VALLERIE - 1111 BOUTEL - 1111 BOUTEL
 PAUL & MARIE LE GORREC - 1111 BOUTEL - 1111 BOUTEL
 PAUL & MARIE LE GORREC - 1111 BOUTEL - 1111 BOUTEL

YEZH ISRAEL

SAVET A VARV

PENNAD KAOZ gant Michel MASSON

Ur gerig a-raok ! Ur menes a gozh eo ar pennad-kaoa-mañ gant an Ao. Michel Masson, anezhañ ur c'helenner hebraeg e skol-veur ar Sorbon. Un toullad bloavezhioù 'so dija hor boa eskemmet un nebeut lishiri, me...



Ar vuhez en ur c'hiboutz (hervez ul levrig bruderezh)

Nevez 'zo em eus kroget en-dro em Flaem evit atizañ an Ao. Masson da gas hor menes kozh da benn. An abeg a vroida as'honan a oa hemañ : degouezhet eo skolioù Dizan war dreusou an Eil Dereh ha diwar-se e vo gwiridik-kenañ kudenn ar sevel-gerioù er bloavezhioù a zeu...

En degouezh m'eo erruet stoum Dizan, n'eo ket didalvoud deomp damvelout e peseurt doare a doa nevez-hebraegerien dencu ar c'hantved-mañ komzet o sachem evit boulañ hañ un hent d'ur skoliadur klok en o yezh.

A-raok klozañ gant ar c'hinnig-mañ e venegñ ez eo an Ao. Masson un arbennigour war gement tra a denn d'an nevez-o'heriaouñ hebraek. Diwar e bluenn ez eus betekammet un nebeut studiadennoù e galleg, dreist-holl daou levr :

- "Les mots nouveaux en hébreu moderne" e ti "Publications orientalistes de France" (1976)

- "Hag er bloaz-mañ : "Langue et idéologie : les mots étrangers en hébreu moderne" moulet gant ar CNRS.

Jorj Abherve Gwegan.

Bremañ : Aotrou Masson, o kelenner hebraeg emao'h e Skol-Veur ar Sorbon, abalamour da betra oa'h bet douget d'ar yezh-se ?

Michel Masson : abalamour da zegouezhiou eus va buhez, setu. Netra n'am douge muioc'h d'an hebraeg eget d'un dra all ; n'on ket Yuzev, na zoken a orin yuzev, met a-viskoazh on bet tomm tre ouz ar yezhoù, an dra-se 'zo sur ; an holl anezho. Darmpredoù am eus bet eta gant lod anezho, a-wechoù on aet pell enno hag a-wechoù all n'am eus graet nemet touristañ drezo, degouezhiou 'zo eo o deus lakaet ac'honan da zibab an hebraeg evel danvez pennañ. C'hoant am befe bet d'o studiñ holl avat ! Hag ar brezhoneg ivez evel just, am eus graet un droig pourmen drezañ, un nebeudig, re nebeut. Re nebeut evit un den evelton hag a oa e dadou kuñv eus Kemper, ha brezhonegerien ! Ur vezh eo din rankout goulemm digant unan all treiñ va labour. En buhez a-zeu en em lakin e-barzh ar jeu, hen touññ a ran !

Bremañ : Ha tu 'zo da c'housoù da be vare e oa bet dilezet an hebraeg evel yezh komzet ?

M.M. : Dre vras, ya. Prouet eo e oa bet ehanet kozz hebraeg an eil kantved goude J.K., marteze un tammig diwezhatoc'h. E gwirionez emañ oadvezh aour an hebraeg etre an 10vet hag ar 5vet kantved a-raok J.K. Goude-se e oa aet war-gil a-nebeudou o verzañ ma oa helebin triezañ hag ur yezh all, tost dezhañ, an arameeg, ur yezh hag a oa ledet war al lodenn vrasañ eus ar Reter-tostañ. Da vare Jezuz Krist eo an arameeg dreist-holl a veze implijet en Douar-Santel, met e kornioù-bro 'zo e veze komzet hebraeg c'hoazh.

Goude dezhañ bezañ paket gwall-lamm da vat gant an arameeg, ne oa ket aet penn-da-benn da get evit kement-se. Dalc'het e oa bet da ober gantañ evit al liderezh hag ivez e-giz yezh-eskemm etre intelektaled, met dre skrid nemetken. Un tammig evel al latin e-touez ar Gristenien-.

YEZH ISRAEL

DA VEV

KELENNER WAR AN HEBRAEG

Komz a rae ar Yuzevien yezh ar vro m'edont o chom enni hag ar re anezho a ouie skrivañ a rae gant an hebraeg (hag ivez gant ar yezh skrivet implijet er vro, anat eo).

Bremañ : Peseurt tu eus an hebraeg hoc'h eus studiet ar muiañ ?

M.M. : Me 'zo kentoc'h un arbennigour war an hebraeg modern, an hini a vez komzet ha skrivet hiziv an deiz en Israel. Met, c'hwi oar, gwall velbich e vefe an hini a studije hebraeg modern hep kaout an disterañ doug d'an hebraeg klasel - ha ken gwir all ar c'hontrol !

Lavaret e vez ez eus hellegourien hag a zo diintet agrenn war ar gresianeg a-vremañ... Ma vefe gwir, e vefe ur Yann e-barkig eus pep hini anezho!

A-hend-all, em eus pleustret dreist-holl war an tremen eus an hebraeg kozh d'an hebraeg modern, war emdroadur an adginivelezh ; penaos e vez savet traoù nevez gant traoù kozh ?

Bremañ : Dres ! Penaos e oa bet gvaet ?

M.M. : Divent e oa al labour. Bez 'e oa daou seurt diaesterioù.

Da gentañ, an diaesterioù teknikel. C'hwi, brezhonegerien, a oar mat petra eo an dra-se : c'hoant bras ho pefe e vefe implijet ar brezhoneg en holl zegouezhoù eus ar vuhez met ne glot ket mat an danvez a zo en ho talc'h gant an ezhommoù : ret eo deoc'h an ezhommoù : ar gudenn evit emsaverien e oa hebraeg ; evito e oa an eienennou klasel o danvez : ar bibl heul. Ne glotent tamm ebet gant oant ken treut ha tra. Ranket dikañ eta. Barrekaat ha pinvidikaat kozn. Da skouer e vez kement ar ger eus ar bibl eil tar hag e roer dezhañ ar ster a "violons". Pinvidikaat a dal-

veze : amprestañ pe govellañ nevez-gerioù. Evel na wellit, emao'h aze war un dachenn anavezet ganeoc'h !

Met bez' e oa diaesterioù all hag a zo dianav-krenn deoc'h-c'hwi. An diazez evidoc'h-c'hwi a zo ur yezh hag a vez komzet c'hoazh. An hebraegerien n'o doa int-i, nemet ur yezh skrivet da ziazez, da ober anezhi ur yezh komzet.

Hogen, pa vezer o ken-skrivañ, e vez amzer en em soñjal, da resisaat, da zifaziañ. Pa vez ur gaozeadenn o vont endro avat e ranker mont buan : ret eo d'ar gerioù, d'ar c'henglokadurioù, d'ar stummoù, degouzhout er spered war an taol ez-otomatek. A-wechoù ez eus tu da chom etre daou war ar c'hraf-mañ-kraf, met war an holl draoù n'eus ket. N'eur deuet abenn da dremen eus ul lusk d'ul lusk all nemet gant strivoù youl dibleg. Ha diank penn-da-benn e oa ar patroù all. Ur brestad galleger hepken, c'hoant gantañ deskiñ yezh e vro, en defe da lakaat poan en ivez, gwir eo ; met tu 'zo dezhañ heuliañ skouer brezhonegerien all : a-walc'h eo dezhañ kemer perzh en ur staj labour war ar

maez da skouer. Netra heñvel evit an hebraeg.

Bremañ : Daoust ha poulaet eo bet an hebraegerien da sevel nevez-gerioù en un doare sistematik dre ma oa intret-holl agintivelezh o yezh gant an ideologiezh vroadelour sionour ?

M.M. : Ya. Miliadoù a c'herioù a zo bet savet diwar skouer deveradurioù an hebraeg klasel. Lod anezho a zo bet govelliet gant tud diouzh o zu o-unan hervez ezhommoù ar mare pe en un doare sistematik. Un darn vras anezho avat a zo bet ijinet gant ur strollad arbennigourien bodet en un Akademiezh.

Bremañ : Ha gouzout a reer an dregontad eus an nevez-gerioù n'int ket savet a-benn da dremen er yezh ?

M.M. : Diaes eo reiñ ur siffr rasis met bras-meurbet eo ar c'holl. 90 % bennak. Ha diaes-kenañ eo kompren perak. Reiñ lañs d'un nevez-ger pe d'ul liviv nevez pe d'ur seurt dienn skorn nevez a zo traoù heñvel a-walc'h ; bez 'e vez atav ur skigner hag un implijer. Ar skigner a soñj dezhañ emañ o vont da reiñ o gwalc'h d'an implijerien, d'ar pezh emaint o c'hedal.



Danset yuzev a orin yemenat

YEZH ISRAEL

SAVET A VARV

PENNAD KAOZ gant Michel MASSON

A-wechoù e ra berzh hag a-wechoù all ne ra ket...Lakaat a ran da 1500 pe 2000 an niver a nevez-gerioù a vez implijet dalc'hmæt gant an holl hebraegerien pe dost.

Bremañ : Digant peseurt yezhoù en deus an hebraeg amprestet gerioù, ha war peseurt tachenoù ?

M.M. : Amprestet en deus dreist-holl elfennoù boutin d'un nebeut yezhoù europat, evel radio pe kongres, telefon, kongert, muzika, sport, h.a... Hag ivez, met kentoc'h er yezh laosk, olfennoù yidich, arabeg ha saoznek.

Koulskoude eo dister a-walc'h an niver a c'herioù amprestet (war-dro 5 % eus geriaoueg pennadoù ur gazetenn) hag ivez niver ar yezhoù a oa bet furchet enno. Souezhus eo an dra-se pa soñjer e oa an hebraeg edod o klask adsevel gronnet gant yezhoù kreñv. Emsaverien an hebraeg a oa bet ranket dezhañ kaout un enskiant lemm ha stourm gant o holl nerzh evit mirout ouzhañ yezh da dreñf da yodaj.

Bremañ : Pa vez kavet gwelloc'h dibab un amprestet kentoc'h eget un nevez-ger, daoust ha tu 'ho lakaat war wei un nebeut "neolemm" o tiaplegañ an dibab-se ?

M.M. : Gwall luziet eo. Abalamour da betra eo bet trec'h an hebraekaat evit gerioù evel "laz-seniñ" (=tizmorret) pe "fo-bal" (=kadurégel) ha n'eo ket deuet an tu kreñv gantañ evit "sonerezh" (=muzika) ha "tennis" (=ténis) ? Perak eo bet hebraekaat warter-polo (=kadurmaym) ha pas polo (=polo) ?

Diaes eo reiñ ur respont met n'eo ket abalamour da se n'eus ket a respont ! Goude hir-sonjal e kred din bezañ kavet daou abeg e-touez ar re bennañ :

-Pa vez soñjet eo etrevroadel ur ger, evel "sport" pe "radio", e tremen e-giz m'emañ en hebraeg. Gant etrevroadel ez eus da gompren evit gwir "boutin d'ar yezhoù europat" ha zoken, resisoc'h c'hoazh : "bou-

tin d'ar yezhoù a veze anavezet gant adsaverien kentañ an hebraeg, da lavarout eo : rusianeg, alamaneg ha yidich". Er c'hontrol, ar gerioù na vezont kavet nemet en ur yezh, ha rusianeg pe alamaneg pe forzh pe-seurt yezh all e vefe, n'int ket bet amprestet (an direizh-gerioù-mañ : yidich, arabeg ha saozneg a c'heller dispiegañ, met ne fell ket din mont dre ar munut). Gwelout a reer eta ez eus amañ abegoù broadelour o ren war an dibab : an holl draoù broadel -da lavarout eo ar pezh a zo a-zalc'h ouzhañ vroad esbraekaat. Met ar pezh ne vez ket merket evel broadel a vez degemeret. Ideologek eo abeg an dibab eta ha klotañ a ra matkenañ gant awen adsavidigezh an hebraeg.



Frapadig diskuizh en ur greizenn "Oulpan" (kreizenn da zeskin ar yezh).

-An dra-se eo ar reolenn ziavez. Bez 'ez eus direizhderioù evel just. Met tu 'zo da zisplegañ ar re-mañ ivez a soñjin, da lavarout eo ez eus is-reolennou anezho. Da skouer, pa vez implijet stank ar ger-mañger, e vez hebraekaat, ha pa vefe unan etrevroadel anezhañ. Abalamour da se eo, moarvat, e vez graet misrad eus "burev" ha

gvéret eus "itron". Hogen amañ ivez ez eus gerioù hag a dremen e-biou d'ar reolenn, ha n'eo ket dre zegouezh. Ur rouestladd iskis eo hag hoalus war un dro.

Bremañ : Hag a-du e oa an holl saverien-gerioù evit amprestet digant yezhoù all ?

M.M. : Savet ho peus ho kouleñ en amzer-dremenet. Met tu a vefe sevel anezhañ en amzer-vremañ. Evit gwir, ez eus diforc'hioù, a-wechoù bras-tre, etre ar saverien-gerioù : n'he deus ket adsavidigezh an hebraeg heuliet un raktres savet en araok, ha n'eo ket bet kreizennet kennebeut.

Evit ar pezh a denn d'an amprestou ez eus tud hag a fel-

Neuze e komprener perak e oa bet graet un istrogeg eus Ben Yehouda p'en doa kinniget d'ar sionourien, e 1800, ober ziek. Gwir eo koulskoude an doa boulec'het ur frailh : bez 'e oa broadelourien yuzev hag a zisprize ar yidich. Disprizout a raent anezhañ da gentañ penn ouzhañ ar getoioù ar yezh-se an amzer-dremenet. Dre esteti-kouriazh e kasaent anezhañ ivez manek eus ur rannyezh c'hermaneg a-walc'h eo, ha kavet e vez en-ek. Evit tud 'zo e oa un druket ! Kavout a rae dezho e rank stabiñ. Prest e oant da selaou hünvreoù Ben Yehouda. Ur frailh tra. Pell e oad ouzhañ adsavneuzek a zo bet eus azginivezh an hebraeg !

Muioc'h a entan eget a boell a zo er menozioù, hag a-

YEZH ISRAEL


DA VEV

KELENNER WAR AN HEBRAEG

benn ar fin ez eo ar bobl an hini a varn, a stlap kuit pe a zegemer.

Bremañ : Ha tom e oa an holl Yuzevien ouzhañ adsavidigezh an hebraeg ?

M.M. : Tam ebet ! Er penn kentañ, da lavarout eo e fin an 19vet kantved, ne oa nemet un niver bihan-bihan a dud eus ar re a oa a-du gant an hebraeg. Da gentañ evel just ne selle ar gudenn nemet ouzhañ Yuzevien Europa, ha dreist-holl re Reter ha Kreiz Europa. Hogen un niver bras-kenañ anezho a oa broudet gant an debron heñvelekaat ouzhañ o orin yuzev, ha diwar-se ne oa nemet foudre kaer gant an hebraeg. Ar re all avat, ar re anezho a oa chomet feal d'o yuzevezh, ne zougent ket muioc'h a briz d'ar yezh-se : lod anezho evit abegoù relijiel pe oñj, en o soñj, e oa eus an hebraeg yezh al lidezezh ha diwar-se e oa pech'hiñ ober gantañ e degouezhoù all ; re all pe gwir e oant broadelourien met en o soñj e oa ar yidich yezh ar vroad yuzev.



Kartenn an "Oulpanoù", kreizennou da zeskin hebraeg dindan 6 miz. Pep kreizenn zo stag ouzhañ c'hiboutz.

c'hwitañ ?

M.M. : Tonket e oa dezhi c'hwitañ ! Ar souezhusañ eo he dije graet berzh ! Soñjit 'ta er skoilhoù hon eus meneged dija : skoilhoù teknikel -trautiek e oa an danvez ha dianzeriet ; tremen a ranket eus ar skrid d'ar gomz. Skoilh an dud - dizemglev a oa etre emsaverien an hebraeg, ha kreñv e oa o enebourien hag o c'hevezerien. Ra soñjo an neb a garo ar pezh a garo eus ar sionouriezh met kalet e oa buhez ar bionierien-gentañ, cheñch endro ha micher a raent, ha ret e oa dezho sevel ur vro gant poan o divrec'h Hag ouzhpenn-se e teur da ginnig dezho cheñch yezh ! Hag ar yezh a ginniger dezho ne vez komzet e lec'h ebet, ret eo hec'h adsevel ivez. Ha n'eo ket aes da zeskin ! Ha n'eus tam-

mall ebet dezho d'hen ober : atav e vez lavaret e oa ret mat da embroidi deuet eus pevar c'horn ar bed kaout ur yezh voutin kenetrezo. Kozh mojenñ an dra-se ! Eus ar Reter pe Kreiz Europa e teue an holl bionierien-gentañ ha gouzout a raent holl pe alamaneg pe yidich, anezho yezhoù tostik-tost an eil ouzhañ eben. Hag evit gwir e oa bet darbet d'an alamaneg dont da vezañ yezh ofisiel ar bionierien.

Perak 'ta eo aet ar maout gant an hebraeg a-benn ar fin ? Kavout a ra din e c'heller me-negiñ daou abeg :

-An dud da gentañ : un bihaniver a oa eus emsaverien ar yezh, met un bihaniver oberiant, ur souezh, tud sevenet, urzhiet, nemet mort, seul vui m'o doa bevet progromoù : divroañ a oa evito en em zuebiñ hag an hebraeg a oa an arouez eus kement-se.

-Abegoù istorel goude-se. Re hir e vefe komz eus an dra-se dre ar munut met lavaromp berr-ha-berr e oa c'hoazh azginivelezh an hebraeg e riskl da gouezhañ an he froull a-raok 1914 ha gelliet en dije an tu kreñv dont gant an alamaneg. Drouzezh an Alaman hag Austria-Hungaria e 1918 a zo bet ur gwall-daal evit brud an alamaneg. An nazied o deus skoet gantañ taol ar marv.

Bremañ : Pa vez gelliet ouzhañ ar micherioù, peseurt tud o deus bountet ar miziañ war-raok evit reiñ laos d'ar yezh ?

M.M. : Ar skolaerien, ar skolaerien adarre, ar skolaerien atav ! Hepto e vefe bet ur mell c'hwitadenn eus azginivelezh an hebraeg -daoust d'an endro istorel a-du (da kreder komz e-giz-se !) - daoust da youl start ar bionierien. Hepto e vefe chomet un oberiantiz kleub -un oberiantiz bev-bunerek mar-tre, met e-kichen ar vuhez witeze, met e-kichen ar drugarez d'ar skolaerien eo bet legadet an hebraeg d'ar vugale hag ar re-mañ o deus komzet ar yezh diwar al lusk kentañ. Evel just e oa bet ranket d'ar skolaerien be-t aprouet hag harpet en o-

YEZH ISRAEL

SAVET A VARV

PENNAD KAOZ gant Michel MASSON

strivoù gant ar familhoù; boulc'h het gant un den e-unan eo deuet azginivelezh an hebraeg da vezañ un oberiadur a-stroll a-benn ar fin. Hep diaraoger, ne vefe ket bet diwaner a meuz; hep skolaerien, ne vefe ket deuet da wir; hep un endro-tud kizidikaet n'en defe ket padet.

Daoust da se, arabat e vefe en em douellañ : un em-droadur dioutañ e-unan eo hini an hebraeg modern ha bez'ez eus ennañ elfennoù hep o far. An hebraeg n'eo ket ar brezhoneg. War un diaz da bogromoù an hini eo bet adsavet ha -ma kreder lavarout- he deus an drajedienn

mouezh war ar silabenn ziv-zhañ" e respontoc'h : "perak pas ?" ; ma vez prouet deoc'h antronoz e vefe poellekoc'h lakaat ar pouez-mouezh en un doare all, e reoc'h aes a-walc'h diouz an ali. Dres evel ma rafec'h ma vefec'h o teskiñ ur yezh estren. Met kit bremañ da lavarout d'ur c'houer eus Bro-Wened e ranko hiziviken lakaat ar pouez-mouezh evel ma reer e kostez Brest ! pe en do da envel an tredan pe an dour-javel e-giz ma ra kelennerien Gemper!



Bremañ : Neuz e n'eus ket gwall fiziañs ermooc'h evit amzer da zont ar brezhoneg ?

M.M. : Ar c'hontrol eo ! Ne ran nemet lavarout he deus skiant-prenet an hebraegerien lakaat war-vel e c'heller leviañ ar yezhoù hag ar re a ra ganto ne-vezou hag ar re a ra ganto heñt da heuliañ. Tu 'zo, ret eo zoken, kemer atiz diwar ar pezh a ra an amezeien, gant ma vo lakaat da glotañ goude-se.

roet tro da beronelezhioù temzet-dreist da lakaat o holl ijin da dalvezout. O birvilh a oa diouz an diseblantid zoken o deus mouget ar Barizianed savenadur Breizh-gant skoazell gredus begenn ar Vretoned, na zisoñjomp ket. Ma vijent savet a-enep, n'en dije gelllet Pariz ober netra.

Hogen, ar vrezhonegerien n'o deus ket gouzañvet ha ne c'houzañvet netra heñvel. A-dra sur o deus gouzañvet trubuilhoù, taolioù disleal ; la-zhadegoù n'o deus ket. Dre an dispriiz pe an diseblantid zoken o deus mouget ar Barizianed savenadur Breizh-gant skoazell gredus begenn ar Vretoned, na zisoñjomp ket. Ma vijent savet a-enep, n'en dije gelllet Pariz ober netra.

Kasas eo an dra-se met daoust hag a-walc'h eo evit reiñ lusk d'un adsav par d'an hini a gasas da azginivelezh an hebraeg ?

Un diforc'h all : emañ o paouez lavarout deoc'h emañ an tu kreñv gant ar brezhoneg e-keñver an hebraeg war un dachenn : komzet e vez brezhoneg tra m'en deus ranket an hebraeg tremen eus ul live skrivet d'ul live komzet. Gwir eo emañ ar fed-mañ a-du ganeoc'h, met a-enep deoc'h e c'hell treiñ ivez ! En hebraeg e oa ur seurt tachen rasket, giz ebet, pouez boaz ebet. Ma vez lavaret deoc'h : "taolil ar pouez-



Kazetennoù en Israel, embannadurioù a gaver en un 12 yezh bennak.

Kemerit ar geriadur da skouer, gant kudenenn ziaes an ampredadennoù. Ha bez'ez eus da "c'hlanata" ? pe da amprestañ ? Un tamig ? Kalz ? ha war beseurt tachennoù ?

Tud 'zo a oa bet fellet dezho peuzhebraekaat pep tra : a-dreuz eo aet, hag em eus displeget deoc'h dija war beseurt bevenn e oa ehanet an hebraekaat. Marteze e c'hellfec'h tennañ ho mad eus an hentenn-

YEZH ISRAEL

DA VEV

KELENNER WAR AN HEBRAEG

mañ : ar pezh a vez implijet stank ne vez ket amprestet. Ar reolen-n-mañ a c'hellfe talvezout evidoc'h, e-giz m'emañ. Er c'hontrol, ne c'hell ket ar reolen all (ar pezh a zo etrevroadel a vez amprestet) bezañ dalc'h het ganeoc'h e-giz m'emañ, rak ar pezh a zo etrevroadel evit rusianegerien, alamanegerien pe yidichegerien n'eo ket heñvel evit brezhonegerien (int a gomz galleg hag a zo digor d'ar saozneg). N'eus ket anv evel just da zegemer e brezhoneg an holl draoù a zo boutin d'ar galleg ha d'ar saozneg ; koll e ene a rafe ar brezhoneg!

Damvenegiñ a garfen koulskoude, ha ne ran nemet imbourec'h-hiñ, e vefe tu gwelout marteze ha ne vefe ket evedusoc'h evidoc'h amprestañ, hep bezañ re spontid, an holl draoù boutin d'ar galleg, d'ar saozneg ha d'an alamaneg. A-dra sur ez eus en alamaneg kalz elfennoù nann-germanek, met evit ar pep brasañ eo bet gwarezet, hag abalamour da se e santer ennañ ur bersonelezh kreñv, diouti hec'h-unan. Evel just e vefe dav ivez gwelout penaos en em gemer ar c'hembraeg hag an iwerzhoneg, ha, mard eo posubl, kenlabourat ganto. Sur a-walc'h e vo graet ur poufer ac'honan, ha me o reiñ alioù e-giz-se hag oc'h emellout eus ar pezh na anavezan ket !...

Er c'heñver-mañ koulskoude e kredan reiñ va soñj krak ha berr : ahe! azginivelezh an hebraeg eo bet ar skolaerien, hag ar skiant-prenet-se a defe lioù-mamm e tlefe ar vrezhonegerien reiñ ar brasañ pouez, hag anaf eo e ranker startaat er c'hentañ derez hag en eil derez -vamm, evit d'ar vugale dizodañ hag envel e brezhoneg ar bed en-dro dezho.

Prederiñ a c'hellfed war ur fed all : n'eo ket bet gwall gerioù ha gwell a-se saveren-evel-se o deus gelllet en dud kemer perzh ivez. Lakomp e vefe hec'h ar roudoù-se, e talc'hetelekvaled ober kinnigoù, met arabat dezho gwallgas ar

A collection of Hebrew text and symbols arranged in a grid-like fashion. It includes various words and phrases in different scripts, such as "על", "ל", "ה", "א", "ב", "ג", "ד", "ה", "ו", "ז", "ח", "ט", "י", "כ", "ל", "מ", "נ", "ס", "ע", "פ", "ק", "ר", "ש", "ת".

Brudet e vez ar gerioù nevez gant Akademiezh ar yezh.

priziusañ : an dud war an dachenn, rak bevañ an hini a reont !"

Ur gerig bennak c'hoazh diwar-benn ar "vrezhonegerien war an dachenn" : mezh o devez eus o yezh alies. Evit distañ dezhi e kav din e vefe evedus kas war-raok obererezhioù "arouezel" evel lakaat treiñ ar panneloù-hent e brezhoneg. Un tres ofisiel a zo gant an dra-se ha brud a zeufe d'ar yezh ma teufe da vezañ muicoc'h boutin en-dro. Ha me o veajiñ dre Vreizh on bet souezhet o welout ne sache ket muicoc'h emsaverien ar brezhoneg war an tu-se !

Perak ivez ne glaskit ket kendrec'hiñ ar genwerzhourien da aozañ skritelloù divyezhek, rolloù-meuizioù divyezhek, h.a... Traoùachoù dister marteze, met pouezus-kenañ...

Bremañ : Goude bezañ dielfennet a-dreuz hag a-hed azginivelezh an hebraeg, daoust ha fur eo c'hoazh ijinan e vo ur yezh ken distantret hag ar brezhoneg e barr he brud er 21vet kantved ?

M.M. : Trec'h an hebraeg a c'hourc'hemenn deomp bezañ optmist ! Met pa ouzer penaos eur deuet a-benn da adsevel a-nezhañ ez eus ivez da arbediñ bezañ kalonek. A-dra sur e c'hell ar brezhoneg bezañ en e holl nerzh er 21vet kantved. Ma fell d'ar Vretoned. Ha dreist-holl ma 'z eo preost un niver bihan a dud da labourat dichepot, da selaoù pobl ar vro, ha da c'heñvel ar chañs war e api.

An dra-se eo a rekentan deoc'h a-greiz kalon. Komzoù dastumet gant Jorj Abher -ve-Gwengen.



STAJOU

■ Penaos ober gant un urzhia-taerez ha diazeoù ar programiñ frammet : 20 eurvezh staj, eus an 20 d'ar 24 a viz Gouere, e-tre 9 eur beure hag 1 eur goude kreisteiz.

■ Programiñ frammet Eil Live : 32 eurvezh staj. Deiziadoù da vezañ divizet diwezhatoc'h.

■ Logo ha roboteg (adalek 9 bl. betek 15 bloaz) - bugale - eus ar 6 d'an 10 a viz Gouere (etre 9 eur beure hag 1 eur goude kreisteiz).

■ Buroteg (sistem MS-DOS, skrivaerezh testennoù, tableur, mearañ fichennaouegoù) : 72 eurvezh. Eus ar 6 d'an 23 a viz Gouere 87.

■ Konterezh hag Informatik : 16 eurvezh : deiziadoù da vezañ divizet.

STAJOU STUDI GANT SKOAZELL
"BOUTIQUE DE GESTION"
ROAZON

■ Da adc'hounit ul live mat war ar c'honterezh dre ober gant an informatik : 58 eurvezh - eus an 12 betek ar 24 a viz Here 87 hag eus ar 7 betek ar 16 a viz Kerzu 87.

Da gaout titouroù hag enskrivadurioù skrivit pe pellgomzit da

OSCR/X2000
Ti Tachenn Veurzh
6 ball ar re Unanet
35043 ROAZON
99.35.11.11.

RADIO ARVORIG

DUMAÑ DUHONT

PEP SADORN

ETRE 12 HA 2eur 422 M GWAGENNOU ETRE

DALC'HOMP SONJ

Diwar choulenn ar gevredigezh Dalc'homp Sonj ez eo bet divizet gant Ti-Kêr An Oriant lakaat anv tri Breizhad da dri straed ar gêr-se : "Job Jaffre" (kelaouenner ha skrivagner brezhoneger), "Youenn Drezen" (kelaouenner ha skrivagner brezhoneger), ha "Paul Ladmirault" (muzikener ha sonaozour).

E meur a gêr dija ez eus bet roet anvioù stag ouzh Breizh pe he sevenadur. Soñjal a ra Dalc'homp Sonj e vefe un dra vat gwelout kêrioù Breizh oc'h heuliañ skouer ar c'herioù -se. Laouen e vo ar gevredigezh-mañ da reiñ titouroù d'an tiez kêr dedennet gant ar menoz-se.

"DALC'HOMP SONJ" niverenn 19 zo o paouez dont er-maez, pennadoù talvoudus a bep seurt, en o zouez : "Kerriadenn Galian an Talhouet" gant Daniel Tangy

ha pennadoù all (e galleg) gant P.Coat, an Dr P.Carrer, JY Copy JJ Monnier, J.Gaucher (Saunders Lewis et le Plaid Cymru), diwar-benn Léon Fleuriot (gant P.Denez, YB Piriou, P.Bernard, F. Favereau ha Y.Bouessel du Bourg h.a...)

20 lur ar skouerenn. Koumanant bloaz 70 lur. Gwerzhet e vez el levr-tiez pe 36 straed Emile Zola 56100 An Oriant.

STAJ ISTOR

Eus al Lun 3 d'ar Sadorn 8 a viz Eost 1987, en Oriant, e vo ur staj-studi diwar-benn lstor Breizh (Breizh en XVIIIvet kantved).

Da gaout titouroù : UPRE staj lstor - Institut Consulaire - 6 straed Kergelenn, 56100 An Oriant - Pellg:97- 64.37.80.

Da geñver ar Skol-Veur Hañv e vez dalc'het bep bloaz, just a-raok Gouelioù Bras an Oriant, e vo ur c'hrash Course brezhoneg. D'al Lun 3 a viz Eost e krogo ar c'hentelioù ha padout a raont betek ar Sadorn 8 a viz Eost en Institut Consulaire (6 straed Kergelenn 56100 AN ORIENT).

Teknik ar "c'hrash-course" eo an hini a vez implijet ganeomp, an teknik-mañ o vezañ bet aozet hag amprout e Skol Veur Breizh Uhel. E-keñver pedagogiezh emañ ar staj dindan renerezh P.Denez.

Labourat a ra an dud 8 eurvezh beadez e-barzh strolladoù bihan -pep hini o kaout ar memes live e-diabarzh ur strollad, gant kelennerien disheñvel o pleustriñ tro-ha-tro war ar yezhadur ar yezh komzet ha distagadur ar brezhoneg.

Tud disheñvel tre o live a c'hell bezañ degemeret ganeomp: deraouidi pe tud barrek 'walc'h dija. Tu 'zo kaout bod ha boued war al lec'h, e kêr an Oriant.

Evit gouzout hiroc'h pe evit lakaat hoc'h anv : M.FLOCH en Institut Consulaire 97.64.37.80

STAJ AR FALZ

Dalc'het e vo 19vet Kendaalc'h-studi brezhoneg savet gant Ar Falz/Skol Vreizh eus ar Sul 30 a viz Eost da 6 eur noz betek ar Sadorn 5 a viz Gwengolo -2 eur- 1987. e" Centre sportif en avant de Guingamp" - le vieux brehec - 22580 PLOUHA -Pgz : 96.22.34.29 Lojet e vo an holl stajidi er memes ti e kambrou 3,5 pe 6 gwe -le (privezioù, lavabo, string-kadenn) war an trepas). Ret e vo da bep hini kas ur sae'h-kousket pe liñterioù gantañ. Degemeret e vo 80 den er staj-mañ. Moaien zo ivez da gampiñ e-kichen an ti met ar priz vo memes hini evit tout an dud.

(660 lur evit an dud koshoc'h eget 12 vloaz + 150 lur enskrivadur ha frejoù pedagogel). Stummadur dibaoez paet gant an embregerezh : 1000 lur).

STAJOU



KREIZENN SEVENADUREL
Treglonoù - 29214 LANILIZ

BREMAN NIVERENN DOUBL 70/71
TAOLENN

■ STAJ C'HOARIVA gant Strollad ar Vro Bagan. Digor d'an holl vrezhonegerien. Ur sizhunvezh stummañ war ar c'hoariva a zo kinniget deoc'h eus ar 27 betek ar gwener 31 a viz Gouere 87.

■ STAJ VIDEO kaset en-dro gant ar strollad TERMAJI. Digor d'an holl vrezhonegerien dedennet gant an teknik-se,skiant prenet ganto dija pe get. Ur sizhunvezh dedennus evit sevel ur film ber 10 mn ha deskiñ implij ar binvioù... Eus ar 27 betek an 31 a viz Gouere.

■ VAKANSOU FAMILH a ginnig er bloaz-mañ Oaled Diwan d'ar familhoù a ra pe o dije c'hoant ober gant ar brezhoneg en o buhez pederziek. Devezhoù aozet mat ha dedennus evit pep hini bras ha bihan, deus ar minton betek an noz... Deus ar Sul 23 a viz Eost betek ar Sadorn 29 goude kreisteiz.

Skrivañ da OALD DIWAN -bourk Treglonoù - 29214 - Laniliz - pe pellgomzit : 98 04 07 04

LIZHIRI	2
DIWAN EMGLEV KAMM DIGAMM	3
ATANTOU EVIT AR VUGALE	4-5
KORSIKA	6-7
10vet FESTIVAL DOUARNENEZ	8-9
DUDI	10
KONTADENN AN HANV	11
AR SKIANT HAG AN HENGOUN	13
UR MENDOZ KAER	14-15-16
NIJKEEL	17
APARTHEID	18
BREZHONEG ER 6VET KLAS	19
AN ARMENIZ	20
TRAMOR	20
TOURISTED SPONTET EN ORIENT	20
LEVRIOU BREMAN	22-23
YEZH ISRAEL SAVET A VARV	
DA VEV	24-25-26-27-28-29
KEMENNADENNOU	30
STAJOU	31
MESK-DIVESK	32

Maketenn savet gant Jil KILLEVERE, Nolwenn LOUARN, Doming JOLIVET, Mikael BAUDU ha Lena LOUARN.

Pennadoù gant Jil KILLEVERE, J.Y. BROUDIG, Alan HEUSAFF, Noëlla DIER, Daniel ar DEVEL, Tangi LOUARN, Yann GELEDEC, A.Vari CHAPALAIN, Herberto HELDER, Mark KERRAIN, Gilbert KEROUANTON, Mikael MADEG, Elen GWENNEG, Doming JOLIVET, Iwan KADORED, L.L., Yann PENNHALEG, Bernez KADORED, Jorj ASHERVE GWEGEN, GARAN AR MEUR

Luc'skeudennoù gant FESTIVAL Douarnenez, Lena Louarn, J.Y. Broudig, U RIBOMBUL, D.Giraudon Elen Gwenneg, SKOL Vreizh, kazetenn an Oulpar.

Renner ar gazetenn Mikael BAUDU

KOUMANANT 120 lur evit ur bloaz, 150 lur evit an estrenvro. Koumanant skoazell adalek 150

BREMAN 8 straed Hoche Roazon

Moulet e ti an O.S.C.R. Roazon 35043 ROAZON CEDEX

EVIT BREMAN NIVERENN MIZ GWENGOLO 1987 : kasil ho pennadoù a-raok ar Sadorn 5 a viz Gwengolo gant skeudennoù pe luc'skeudennoù m'eo posubl.

E tomnder hor yezh

LA BRETAGNE EN VERSION ORIGINALE - THE CELTIC ANGLE ON THE CONTINENT



GOUEL AR GELTED WAR MINITEL

ouel ar Gelted a vo hevlene en Oriant adalek ar 6 betek ar 16 a viz Eost. Tu a vo da c'houzout ar rollad o lenn kelaouenn, kazetenn delematek brezhonek gallek. Pell: 36/15 Alc'houezh TC ger-tremen: KELA.



- Kaler ar vro
- Gouelioù, Fomd bre ...
- Levrioù nevez embannet
- Skañv Uhel ar Vro
- C'hoariva
- Kentelioù brezhonek

LEVRIOU DA C'HOUNIT

etek an 13 a viz Gouere e vez aozet gant KELAOUENN, kazetenn delematek brezhonek-gallek, ur c'hoari war an dud a vrud vat e Breizh gant levrioù da c'hounit : skouerennoù levr tresadennoù Michel Devigne nevez embannet gant Dalc'homp Sonj. Evit c'hoari grit neuze 36 15 gant ar pellgomz ha da c'houde TC kas ha KELA kas gant ar minitel.

GERTIADUR AR GLEAU embannet gant Al Liamm

Deut eo er maez 4re lodenn gertiadur galleg-brezhoneg Ar Gleau. Moulet ha keinet brav eo ar 4 levr-mañ. (Tom I A-B, Tom II C-Dbla, Tom III Dbl-o-Embeg, ha Tom IV Embel-Fileri)

MESK DIVESK

BEC'H D'AN EUZ E PLOUESKAD

Emañ krog an INSEE da bri-entiñ an niveridigezh da zont, a c'hoarvezo a-benn daou vloaz. Ur c'houlz mat eo eta da reiñ da c'houzout ar goulennoù a vefec'h laouen o welout en enklask-se : Pet podad kafe a vez evet bemdez gant an dud, pet gwech e vez sakreet en ur sizhun, pet kazh pe ki a vez savet en ti, peseurt tabutoù a vez gant o amezeien, pet skouarnad a vez roet d'ar vugale, ha marteze... peseurt yezh a vez anavezet ha komzet gant an dud. Skrivit d'an Ao. Rener an INSEE - plasenn Colombier - 35000 - Roazon -

Merc'hedigoù berrwisket ha paotredigoù o kerzhout agammedoù, o c'hoari a-stroll dirak un engroez a gerent ha pennoù bras ar gêr hag an E.N. Setu aze peurlvuiañ ar bras eus Gouelioù ar Yaouankiz.




Tennañ a ra kalz d'an dibunadegoù soudarded. Hag evit dont a-benn eus un urzh ken brav war un dachenn-sport, nag a labour gant ar vonitourien e-pad tri miz. Gwashoc'h c'hoazh: e kêrioù 'zo, evel e Roazon, ma n'asant ket ur skol kemer perzh er gouel, ne vez roet monitour-sport ebet gant an ti-kêr !

Pidenn Porsmeur e Ploueskad a zo bet lakaet da darzhañ : feuket eo bet ur skolaerez en ur bourmen he skolidi war an aod. Perak eo bet strafuilhet pe entanet ar vaouez-se gant seurt arvest kinniget gant an natur abaoe milvedoù ? (sikour DC Freud) : p'he deus douget klemm ouzh ar maer, eo bet implijet an dina-

Labourat a ra kalz an Ao SEGUIN evit broudañ al "labourioù bihan". E miz Ebrel en deus sinet un emlev gant renerien ar c'hazetennoù evit ma vefe kresket niver an dougerien (kasit ur gerig deomp, mes fell deoc'h resev BREMAN bep miz da 5 eur mintin, e-lec'h gortoz paotr al lizhiri).

E miz Even zo bet embannet un teuliad gant an Ao. F. DALLE evit kinnig doareoù nevez da implijout tud ur wech an amzer hag isgopret. Met, a-hervez, ne oa ket gwall zonezonet an Ao DALLE. Setu amañ eta un toullad menozioù evitañ hag evit an Ao. SEGUIN : implijout tud evit dougen laezh ha bara bemdez er gêr, aotre ar vugale da naetaat ha da lufrañ botoù ler er straedoù, broudañ pilhaouerien da adstagañ ganti, ijinañ micherioù all evel pourmener chas (a vefe anezho e New-York dija, flourer plant, douger disglavier, pe lunedoù.) N'eus nemet un diskoulm d'an enkadenn : lakaat ar binvidaeien da implijout muioc'h-mui ar re baour. Diouzh un tu ar vistri, diouzh an tu arall ar sklaved !



mit ken buan ha tra. Setu aze un erv nevez boulc'het ganti evit paotred an R.P.R. pe ar F.N

Hag arabat dezho chom a-sav ; kalz a draoù a zo re bar d'ur c'halc'h e Breizh, pa ne vefe nemet ar peulvanioù, tourioù an ilizoù, peulioù tredan E.D.F., betek an den e-unan, darn anezho kentoc'h. Dav dezhi...

Da 6 eur 25 an dihun, da 6 eur 50 ar bedenn, da 7e al lein. Kentelioù betek 11 eur. Da 11 eur an overenn div wech ar sizhun. Ur bedenn all da 18e40 ha da 19e50. Er gwele de 20 eur pe da 21e 30.

Setu aze un tamm eus implij-amzer ar skol gristen a vo digoret war lerc'h an hañv e KASTELL-AN-NOE (35), gant diskibienn an Ao. Lefevre. Ar pemvet skol a-seurt-se a vo e Bro-C'hall, kentañ hag eil derez : 2000 lur bep miz evit ur bugel, an deskadurezh hag al lojeiz !

Da gentañ ne vo degemeret nemet paotred (ar merc'hed n'int ket tud gouest da dizhout ar palioù-se eta).

Evezh a vo taolet ouzh gwiskamant ar vugale : difennet ar blue-jeans hag an dilhad embregerezh-korf ivez (ha difennet e vo gwalc'hiñ e revr ?).

Arabab dont gant blev hir ha difennet e vo ar c'hoarielloù, al levrioù pe ar madigoù a vefe degaset gant ar vugale (dastumet e vezint). Memestra evit pladennoù, kasedigoù pe radioioù.

Adkavout a reomp amañ reolennoù diazez ar bedagogiezh du, hini an 19vet kantved, a zo bet savet an nazied hervezo (gwelout niv. diwezhañ) : ne vez ket doujet ouzh ar bugel evel un den, ul loen fall eo evel just.

An deskadurezh-se a zo ar pal anezhi (hervez skrid-diazez ar skol), sevel kristenien vat, deskiñ d'ar vugale doujañ d'ar galloud ha stourm ouzh an dispac'h sevenadurel...

Ad nauseam...

GARAN AR MEUR

